

Klaoda : Claude Marie Le Prat (Brest 1875 – Vern d’Anjou 1926)
Mouez reier Plougastell (Bet embannet e 1905)
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

D’al lenner.

Kinnig.

Parrez Plougastell.

Va fask kenta e Plougastell.

Kerzadiou ha Plougastell.

Maro Frañseza e Plougastell.

Kalvar Plougastell-Daoulaz.

Or Mamm-Vro Breiz-Izel.

Me ‘gar va Breiz-Izel.

Bepred Breizad !

Hirvoudou ha pedenn.

Netra na dalv va Breiz !

Breiz, Brezoneg ha Feiz.

Yez Vreiz-Izel.

Ar brezoneg.

Bleun nevez.

Ar brezoneg atao !

Tristidigez ha ged mad.

War zav !

Ar Vretoned hag o gwaskerien.

Er baradoz.

Pedom an Intron Varia.

Bet soñj euz an anaon.

Nouel nevez.

Maro ar breur Yann en Eusa.

Gwerz war vuhez hag oberou an Aotrou Markiz a Germaker (1815-1895)

Maro eur Breizad yaouank.

Ar wezenn hag ar zitrouillezenn.

Kroazig va gouestlou.

An nevez-amzer.

Al labourer-douar.

Ar wazig dour.

Nedeleg ar glaouaer.

Mouez an Anaon.

Ar paotr bihan kamm.

An tad-koz.

An deliou en diskar-amzer.

Chomet en ho klud.

Meuleudi bro-Leon.

Ar vezventi villiget.

Al luskellerez.

Poan ‘rafes d’ah êlig !

Seiz Sant Breiz-Izel

A-raog.

Sant Kaorintin.

Sant Brieg.

Sant-Pol a Leon.

Sant Patern.

Sant Tugdual.

Sant Samson.

Sant Malo.

Santez Gwennig. (Iskiz a-walh).

Notenn a-berz Embann an Hirwaz :

Al leor-mañ a zo bet adembannet e-keñver an Istor. Rouez-kenañ an dud a zoñj bremañ evel ma ree Klaoda diwar-benn ar relijion.

.

D'al lenner

Edon e soñj pell 'zo da zastum en eul levr an oll varzonegou strinket euz va fluenn abaoe m'on en em lakaet da skriva e brezoneg.

Eul lodenn vraz anezo a zo bet kurunet gand Kevredigez Bro-Vreiz ; lod all a zo bet moulet war *Groaz ar Vretoned* ; en diwez, eul lodennig a zo bet chomet em faperou.

Va harantez virvidig evid va bro Breiz-Izel, eo he-deus va foulzet da zevel ar Barzonegou-mañ ; ar hed d'o gweled oh ober eur vad bennag d'am Henvroiz, o sikour sevel *Spered ar Vro*, setu ar pezh am doug hirio da lezel o moulla evid ma'z aint e-mesk an dud.

Dastum a ran va Barzonegou, da genta, evid va flijadur va-unan ; va mignone^o ivez koulskoude, me 'gred, a en em bilijo oh o lenn.

Nag a dad a zo e peb renk, e pep stad, ha na zoñjont tamm ebed o-deus ar Vretoned eur spered kaer dispar da zevel ; eur spered ha n'en-deus netra da hoantaad d'ar sperejou all ! Ma fell din komz euz spered on bro Breiz-Izel, da lared eo ar stagedigez oh yez, feiz, kanaouennou, gizioù ha gwiskamant ar Vretoned kêz, on tadou. Ya, hen larvaed a ran gand kalz a hlahar, eun niver braz a Vretoned a ankounac'ha kement-se. O ! mar gellfen dre *V-Mouez Reier Plougastell* c'hweza karantez Vreiz e kalonou an dud vorgousket-se, pegement e ven dihaouet euz ar boan am-eus kemeret.

Bennoz da Zoue ha d'ar Zent eüruz, Patroned Breiz-Izel ! Eur Vreuriez nevez-ganet, ha koulskoude skeduz ha brudet a zo en em skignet dre or bro da hweza an tan e peb leh, da strilla yenienn sklasuz kemend a dud paket o divreh ganto, hag harpet da zelled a be tu e teu an avel, heb ma rafent an disterra van euz a netra !... C'hoant he-deus ivez ar Vreuriez-se da zigeri o daoulagad da vuioh c'hoaz a re all,tud dall pud, ha na fell mui dezo komz yez o zadou-koz ; a zo fae ganto komz e brezoneg, evel m'o-defe mez o tiskouez eh anavezont yez o bro. Kevredigez Bro-Vreiz he-deus a-vremañ douget kalz a frouez, ha fiziañs on-deus e tougo c'hoaz muioh en amzer da zond.

Skrivom, lennom, komzom ha kanom e brezoneg, yez meurbed benniget ar Gelted, degouez sakr deuet deom a-dreuz eun niver braz a gantvejou. Ma n'her greom ket, kredom ha kredom stard ne vefom ket didamall, hag ar re a deuio war on lerh o-devezo gwir da houlen diganeom peseurt implij on-devezo greet euz yez o bro...

Seul-vui ma reer brezel d'on yez, seul-vui e tleom stourm o tiskouez muioh-mui a garantez eviti, oh he homz, oh he divenn dre or skridou galleg ha brezoneg,mar d'or gouizieg a-walh evid-se.

Ha bremañ, va levrig, kerz en hent, ha gra kalz a vad.

Klaoda.

Kinnig

Me 'fell din kana gand dudi
Meuleudi deoh, Gwerhez Vari ;
Euz eur penn d'ar penn all d'ar bed,
Me 'garfe ho kweled karet.

Me 'ginnig deoh, o ! Mamm dener,
Va mouez ha va zelennig ker,
Grit ma kanin atao yez Vreiz,
Evid va bro, evid va feiz.

War ar barzig dister Kloada
Lezit ho pennoz da goueza,
M'em-beus ho karet, m'ho karo
Beteg an eur euz va maro.

O ! Rouanez vad Breiz-Izel,
Roit d'ho Pretoned ho skoazell,
Ma kendalhit oll kaloneg
Da stourm evid o brezoneg.

Notenn el leor orin : Va levr a ginnigan ivez d'am mignon Abherve d'an hini¹ ez on kalz dleour ; da'n oll Varzed, a garan evel va breudeur ; d'am herent ha da oll dud ar mêziou, e-touez ar re² a lakaan dreist pep tra tud vad parrez Plougastell-Daoulaz, a blijo ganto e lenn, d'ar re a raio eur vad bennag, fiziañs em-eus.

Kloada.

¹ d'an hini : da behini, el leor orin.

² ar re : da bere, el leor orin.

- **Mouez Reier Plougastell**
Kenta lodenn
Plougastell-Daoulaz

Kleier Plougastell

(D'an A. Iliou, Person Plougastell.)

Piou n'en-deus en eur dremen e-keñver Plougastell
War beg douar ar vro-ze gwechou taolet eur zell,
Evid gweled ar herreg, peulvaned greet gand me
Savet ganto en neñvou linenn rouzet o hein ?
Kemeret 'vent 'vid lehiou armet d'en em zivenn
Ouz eonnenrien ar mor, a stleje an anken...
Ar reier-mañ n'o gwellañ a ra din-me soñj
E brezelioù Breiz-Izel oh ar Zaozon gwechall.
Diwarnezo marteze 'eus bet Plougastelliz
O stourm 'eneb an estren 'vid mired o frankiz.
O ! nag int renket braoig war ribl ster Landerne
Gand eun dorn oll hallouduz, dorn nerzuz on Doue !
Me 'wel reier ar Mêasiou, larkoh Roh-Nivelen,
Roh an Impalaerez, ivez Roh Kerezen.
Ar pezh 'zo bet lavaret, me 'gred, a Blougastell :
 Breiz-Izel, na kaerra bro !
 Koad en he hreiz, mor en he zro !
Peb bro he-deus he madou, traou ha traou all kaerroh,
Nikn, an oll ma hredo, , 'ez eus reier koantoh...
O ! diou roh wenn va hêrig, o ! reier Kerzadiou,
Ho kwelet 'm-eus n'oun ped gwech em haerra bloaveziou ;
O tiwall va bandenn zaout war yeot ho letonenn
M'em-beus gand va mignoned greet meur a abadenn.
C'hwi 'gemere ho lodenn en on flijaduriou,
Hag e responte skiltruz d'on oll c'hoar zadennou.
Gwaskedet en ho kostou, al labousedigou
A ree eun trouz dudiuz oh ober o neiziou.
Ma tegoueze deom moned el lehiou-ze riskluz
Prestig e veze klevet kriadennoù doaniuz.
En ho kichenn ni 'bigne pa'z oa tomm an amzer,
Evid gweled an neiziou ha gweled ar pellder.
Abredig en ho faoutou al labousedigou
A gane, a ziskane mil gwech o houblajou ;
Or halon el levez, ni a ree evelto,
Or mouez 'veze kaset pell braz gand an hekleo,
Na kaer e vez d'an hañvou reier braz Kerzadiou
Goloet oll a hlizez, a vrud, a vokedou !
Plijadurez eo gweled ar gwesped, ar gwenan,
O vond d'ar bokedou, o hleved o richan !
War gerreg braz Plougastell e kaver ar bleun aour,
Boked hirbad Breiz-Izel, boked liorz ar paour ;
Al lann melen, ar balan, ar brug ruz a ziwann

War gerreg braz Plougastell anezo o-unan
Da zeiz ar pardon brudet e Sant Yann Plougastell
Koz ha yaouank Kerzadiou a re war an uhel,
Beteg kern Roh-ar-Mêaziou evid gweled ar ster
Goloet oll a vagou o vond war-zu ar gêr
Ped gwech em-eus evet war gerreg ar Mêaziou
Êr yahuz ar ster goant a walh mein on aochou !
Diwar Roh-Niveleñn an dudiusa sell
War Vrest ha war ar porz, war barrez Plougastell !
Eno an den a zo 'vel pa larfen mezo,
Ker kaer e kaver pep tra er pellder tro-war-dro ;
Hag heb goulenn perag e galon e spered,
Evel an alhweder a lez an traou krouet,
Evid pignad uhel, e-neñv, da gaoud Doue
En-deus greet ker brao ar bed evid e vugale !
Livirit deom, o ! reier, ha n'oh ket bet laket
War-dro parrez Plougastell, evel eur gouriz kaled,
Evid mired 'touez an dud giziou ha feiz gwechall
'Eneb tud fall ar hêriou ha gwaskerien Vro-Hall ?
C'hwi, reier, hoh-eus gwelet war zouar Plougastell
N'ouzoh dare ped remzi o vond a-ziwar wel ;
Livirit deom-ni eta hag heñvel om hirio
Oh ar Blougastelliz koz, pell braz a zo maro.
a ! reier, livirit c'hoaz hag ar Blougastelliz
En amzeriou tremenet a oa ker kreñv o feiz ;
Ha gwelet 'vezent neuze war gorrhou o roched
O vond pell da bardona, 'giz gwir belerined ?
Ha douget ez oa gwechall doujañs 'vid ar bleo gwenn
Evel ma'z eus hirio en on tiez kristen ?
A ! mirit, Plougastelliz, ho kiziu enoruz,
Mirit ha prageier gwenn, hag ho ponedou ruz
Ho chupennou glaz an neñv, dillad an amzer goz,
Bet douget gand ho tadou pell zo er baradoz.
Mirit ho feiz virvidig meulet e Breiz-Izel,
Ha mirit ho prezoneg evel eun dra zantel.
E-giz ho reier kaled, ho parrez venniget
A jomo sonn en he sav, eüruz hag enoret,
Pa vo kalz all marteze kouezet izel, siwaz !
Dre m'o-devo kemeret giziou ar hêriou braz ?...

Parrez Plougastell

(D'an A. Gall, Person Fouenant).

Plougastell abaoe pell zo
Eo gwella parrez tro-war-dro ;
N'eus enni nemed tud a feiz,
A gar o Doue hag o Breiz.

Da zul, da houel, en overenn,
Aliez er gousperou zoken,
E vezont en iliz bodet
En-dro d'o beleien karet.

Na kaer eo ar Blougastelliz
Pa'z eont beb bloaz da Lourd gand feiz,
Da bedi 'barz treid ar menez,
Da eva euz dour ar Werhez !

Na kaer eo ar Blougastelliz
Pa'z eont d'ar pardonioù gand feiz,
Da weled sent o chapelioù,
Gand o dillad a bep seurt liou !

N'eus nemed an divroidi
Hag a rafe droug braz enni ;
Ar re-ma~~, siwza, aliez,
A zo ar skwer fall er barrez.

O ! Plougastell, bro ar sivi,
E doujañs Doue ra jomi,
Gand da feiz kreñv ha kaloneg,
O komz bepred ar brezoneg !

Mir ivez ar hizioù santel
Sanket ken don e Breiz-Izel,
Ha ro deom evel eun degouez
Gand on tadou leun a furnez.

Va fask kenta e Plougastell

(D'am mignon, an Abad Vigouroux, beleg e Montroulez)

En deiz a-raog, va moereb vad
Abred am hasas da gousked,
Gand aon n'am-bije 'n eur hoari
Saotret va ene o pehi.

Divunet pell a-barz an deiz
Va halon a lamme em hreiz,
Gand hast da voned d'am Zalver
Am gortoze war an aoter.

Teod lemm an den ne hell lared,
Pluenn ebed n'he-deus skrivet
Mezventi dudiuz an ene
Deuet da veza ti he doue.

Devez eüruz e peb doare,
Sklêrreet gand an hoel a bare ;
Iliz sant Per a oa gwisket
Gand bleun en derhent kutuillet.

Em spered e chomo bepred
Ar houn euz an deiz benniget
Ma resevis d'ar wech kenta
Jezuz, ar mignon tenerra.

O ! devez kaer va Fask kenta,
Hep hini heñvel er bed-ma',
Evidon c'hwi 'oe luhedenn
An deiz a bado da viken.

Tridal a ra gand levenez
Va halon pa daolan evez
E prosesion ar Feunteun-Wenn,
En deiz-se skeduz ha laouen.

Tregern a ree ar parkeier,
An hentchou don, ar prajeier,
Gand mouez nerzuz ar vugale
O kana meuleudi Doue.

E chapelig or Mamm Mari,
Savet gand on tud-koz dezi,
Ni 'douas chom atao fidel
D'on Zalver ha d'e Vamm zantel.

Na traou ar bed, nag an amzer,

Daoust dezo da veza pounner,
N'hellint euz va spered tomm
Soñj dudiuz va Fask kenta.

Kerzadiou ha Plougastell

(D'am mignon Constant Kervern)

O ! Kerzadiou azezet brao
Etre krehennou ker koantig,
E-touez ar helvez hag ar skao,
Dit da harantez virvidig.

Da zoñjan en amzer eüruz
Hag am-eus ennout tremenet
E teu din huñvreou dudiuz
A ra d'am halonig lammed.

Gweled 'ran hirio 'giz neuze
An ti koz toet gand plouz gwenn ;
Eno va moereb a veve
Gand he nizig Klaoda hepken.

Va gallet e vije gweled,
Ar skol echu, der ar hoajou,
O lammed a-dreuz hag a-hed
O kas d'an hekleo forz soniou.

Me a gare meurbed d'ar yaou³⁴
Bale e-touez ar sivi ruz,
Dindan ar gwez braz avalou,
En draoñienn, tost d'ar ster trouzuz.

Koulskoude 'plije din muioh,
Mond beteg kerreg ar Mêziou ;
Eno, savet war gern eur roh,
Va-unan, me 'ree kalz soñjou...

E harz va zreid, me 'wele 'r mor,
Ster Landerne oll goloet
Gand bagou Leoniz a Gerhor
O pesketa gand ar roued.

War-zu Brest pa vezen troet,
Savet uhel war e iliz
Tour braz Sant Martin benniget
A ree din koun euz a Zant-Loiz.

O koun meurbed c'hweg d'am ene,
C'hwi 'zo levez va spered ;
En iliz-se, eun deiz a oe

Er mên-found⁵ on bet kristenet.

Ilizig koant ar Feunteun Wenn,
Test a feiz kreñv on tadou-koz,
Am gwele aliez o houlen
Digand Mamm Jezuz he bennoz.

Doue roas din em yaouankiz
Mignoned euz ar re wella.
O bloaveziou evel eun deiz,
Penaos e hallfen ho prena ?

Vigouroux, Constant, tud feal,
Ha n'ankounac'hain morse !
Ra vevim er bed didamall
Ma vim unanet e Doue !...

Pa zegoueze vakañs ar skol,
Nag a zeveziou evuruz,
Er parkeier, 'barz en disheol
Gand va levriou dizennouûz !...

Tremenet 'm-eus er gêrig-se
Eun darn vad euz va youankiz ;
Ha pa'm galvas mouez Doue,
O pellaad, daelou e skillis...

Pa zistroan da Gerzadiou,
Eur wechig an amzer hepken,
E tegouez din goulenn kelou
Euz tud ha na welin mui ken...

Siwaz ! an Ankou didruez
A sko, a sko da beb mare...
Va moereb n'eo mui e buhez,
Kalz mignoned maro ivez !...

⁵ mên-found : ?

Maro Frañseza e Plougastell

(E koun va moereb)

Marteze, Breiziz, e kredit
Ez oa Frañseza eur briñsez ;
Va mignoned, fazia 'rit,
Rag n'oa nemed eur goueriadez.

Kement he-deveus va haret,
Ar voereb ker, en he buhez,
M'eo diêz din hel lavared :
Setu gwerz va zristidigez :

Sonit, kleier, sonit afo ;
Sonit, kleier, sonit kreñvoh ;
Va moereb vad a zo maro !
Sonit, kleier ar hañv tristoh...

D'an dri war 'n ugent a Gerzu,
Er bloaz naoñteg kant 'med unan,
He ene ; dreist ar houmoul du
A yeas daved Mestr ar bed-mañ.

E gwered Plougastell brema',
Kuzet, en eur hornig distro,
E kavfoh he bez, ar paourra,
E disheol eru wezenn dero.

Ho-pet, termener, karante'
Da lared eun *Dre profundis*
Evdi ar vaouez 'zo aze,
Hag a zavo skeduz eun deiz.

Kanit, laboused, kanit 'ta,
Kanit gand ho kaerra mouez ;
Livirit : « Kousket eo houmañ,
O hortoz ar varnedigez... »

Diwanit stank, bokedou koant,
War bez va moereb Frañseza ;
Savit, bleunit, hervez ar c'hoant,
Gand ho liou kaer, ho c'hwez gwella.

Ho karantez pa edoh beo,
Moereb, a oa evidon-me ;
Hirio, siwaz ! pa'z oh maro,
Ha c'hwi am ankounac'hfe ?

Koulskoude 'vel m'eo ken diêz

Degouezoud en neñvou war-eon,
Me 'bedo, 'vidoh aliez
Ar Werhez, Mamm an oll Anaon.

Kalvar Plougastell-Daoulaz

D'am mignoned L ha P. Carret.

O ! c'hwi, Plougastell eüruz,
Leh hoh-eus da veza lorchuz,
P'hoh-eus en ho parrez dispar
Eun dra gaer evel ho kalvar !

Ar halvar-mañ a oe savet
Tri-hant vloaz a zo tremenet,
Dre bromesa 'pad ar vosenn,
Pa oe salaouet ar bedenn.

Hervez e lavar kalz a dud
Kalar Plougastell 'n-deus ar vrud
Da veza euz ar re gaerra
A heller gweled er vro-mañ'.

Kalvar dudiuz Plougastell
A zo eun testeni uhel
Euz a feiz kreñv on tadou-koz,
Eüruz pell 'zo er Baradoz.

A beb amzer Plougastelliz
P'o-deus bet da ziskouez o feiz
Ouz aour na poan n'o-deus sellet,
Ouz o harantez n' laran ket.

Gwechall ar halvar a gaved
O tegouezoud 'barz ar vered ;
Hogen, hitio ar re varo
Pellohig zo 'n eul leh distro.

Kroaz koz Or Zalver koulskoude
E Plougastell a vez bemde',
Enoret, pedet ha meulet
Gand kalz tud a deu d'e weled.

Din-me ez eus bet lavaret
Eo bet ar halvar marhataet
Gand divroidi binvidig
A Vro-Zaoz, me 'gred, genidig.

Dezo diohtu 'oe respontet :
« Ar Halvar deoh na werzfom ket,
Goude ma paefeh deom e bouez
En aour hag en arhant nevez.

Gwir donezon euz on tadou

Ar gwella eo euz or madou ;
Kentoh eged e zilezel
'Karfem ivez kenkoulz mervel. »

Na furra respont ! a-dra-zur,
Hag a ra d'an oll plijadur.
Plougastelliz, dalhit pell braz
Ho karantez evid ar Groaz.

A-benn nebeud, e kalz lehiou,
C'hwi 'welo diskar ar hroaziou ;
Beza zo gand Breizad en ho kreiz,
Mirit ho re, Plougastelliz.

Na kaer eo da Houel an Oll-Zent,
Pa'z oa ar heleier o han sklent,
Mond d'ober tro ar halvar koz,
O houlenn d'an Anaon repoz !

An dud hag an amzer zoken
Er bed-mañ prim braz a dremen ;
Nemedoh, Kroaz sakr va Zalver,
A jom bepred en uhelder.

Ped remzi ho-peus-hu gwelet
War zouar Plougastell tremenet
C'hwi, va Jezuz, war ar Halvar,
A-dra-zur, c'hwi hepken her goar !

Teñzor talvoudz or parrez,
Evidoh eo or harantez,
Keit ha ma chomfoh en or hreiz
Ni 'vo bepred stag ouz or feiz.

O ! va Jezuz, war ar Halvar,
Selaou ho kenteliou ni gar ;
C'whi eo on nerz, or sklêrijenn
Pa deu warnom harzou anken.

Or mamm-vro Breiz-Izel

Me 'gar va Breiz-Izel.

(D'an Aotrou Loth, dean skol-veur Roazon).

Me 'gar va Breiz-Izel ! va mamm vad, va bro goz,
He-deus e peb amzer kaset d'ar Baradoz
Bugale galoneg, rouaned, sujidi,
Barzed, meneh, gwraez, hag a gare pedi !

Me 'gar va Breiz-Izel ! Mamm-Vro Marzin, Lez-Breiz,
Arzur, Gwesclin, Gradlon, ha re all c'hoaz a-leiz,
Marheien, tud a vor, a reas enor d'o bro,
Ouh he divenn bepred beteg pred o maro....

Me 'gar va Breiz-Izel ! gand heh ilizou koz,
Kouentchou santellet gand pedenn deiz ha noz,
Kroaziou dantellezet, touriou uhel savet,
Mein-hir ha taoliou-mên, enni⁶ dre-oll hadet !

Me 'gar va Breiz-Izel ! kelhet brao gand ar mor,
Goloet a vagou, o goueliou gwenn digor :
Me 'gar he frajeier ; krehennou ha koajou,
Gand ho mêsaerien o kana forz soniou !...

Me 'gar va Breiz-Izel ! o vriatad ar groaz,
Oh he sanko bemdez war ribl an hentchou braz,
Me gar va Breiz-Izel ! o tivenn madou sakr,
Beteg ar gwad zoken, eneb an dud fallagr.

Me 'gar va Breiz-Izel ! evel eur berlezenn
O lintra, skeduz braz, dirag dremm an estren ;
Galloud a reer gweled e pevar horn ar bed
Poblou a-bez 'n o zav, ouz va Breiz o selled...

Me 'gar va Breiz-Izel ! me 'gar va henvroiz,
A zalh d'o Brezoneg, 'vel ma talhont d'o feiz ;
Me 'gar an dud dispont en em gann er brezel,
Brezel garo meurbed d'on oll giziou santel !

Me 'gar va Breiz-Izel ! Me he haro atao !
Va halon eviti da viken a lammo ;
Bete pred va maro kaloneg me 'gerzo
War roudou va zud-koz... Breiz-Izel ra vevo !...

⁶ enni : enno, anezo.

Bepred Breizad !

(D'am migon Al Louet, Mestr-skol.)

(War don An hini goz.)

Diskan

Va halon 'zo
Gand va bro,
Ha bepred e vezo !

Hag ez afen da benn ar bed
Gand Breiz da halon 'vo bepred.

An heol, gwir eo a wel broiou
E-leh 'eus muioh a vadou.

E Pariz traou brao a weler,
En he skoliou kalz a zeseker ;

'Mesk ar Zaozon on bet ive' ;
Ni 'zo paour dirag ar re-ze.

En oll lehiou forz pegen kaer,
Va spered a nije d'ar gêr.

Beteg Rom zoken ez on bet,
Ha Breiz n'em-beus ankaounac'haet.

Va daoulagad 'glaske al lann,
Ar parkeier leun a valan.

Ne welen mui ar haer bragou
O-deus miret deom on tadou.

Ne gleven ken nemed galleg,
Ha tamm ebed a Vrezonég.

Ne gleven mui ar marvaillou
A lar deom e Breiz or mammou.

Va halon a lamme em hreiz
Gand hast da zistrei da vro Vreiz.

E Breiz bremañ me a jomo
Beteg an deiz euz va maro.

Felloud a ra din e Breiz-Izel
Beva gwir Vreizad ha mervel.

Ha beteg penn me 'labouro

Evdi va Breiz, evid va bro.

M'am-bezo gand ar Halloudeg
Gopr an dud vad ha kaloneg.

Hirvoudou ha pedenn

(D'ar barz Taldir)

Va halonig ennon a zo oll ankeniet,
Pa welan Breiz-Izel, va bro mia-garet,
Gwallgaset gand tud fall enebourien peb ma...
O Doue, pebez kalonad !

Hag e klaskont taga gand kalz hardiziegez,
Pez ao gwella e Breiz : He hiziou hag he yez,
Evid mouga ennon feiz kreñv an Arvoriad...
O ! Doue ! pebez kalonad !

He gweled a reer stank dre hentchou Breiz-Izel,
O hoapaad ar Vreiziz, or hredennou santel,
O teuler dismegañs war gement a zo mad...
O ! Doue, pebez kalonad !

Gwazed kreñv mêziou Breiz, leun-barr ho kwazied
Euz gwad yah on tadou, ar Vreiziz ken brudet,
Pegeid c'hoaz e chomo serret ho taoulagad !
O ! Doue, pebez kalonad !

*

Arzur, Marzin, Lez-Breiz, savit euz ho peziou !
Embannit ar brezel⁷, Bretoned a-strollou
A zeredo gand pres, a stourmo evid mad !
O ! Doue, klevit va mennad !...

Kement a hoantaom : frankiz ha lealded
A lemmer tamm-ha-tamm digand ar Vretoned ;
Enebom, kevreiz, unanet er stourmad.
O ! Doue, klevit va mennad !...

O ! va Zalver Jezuz, Doue ar Vretoned,
Pegeid ouzom eta 'vefoh-hu kounnaret ?
Roit ar peoh, ni he pedi, c'hwi hag a zo ker mad !
O ! Doue, klevit va mennad !...

Itron santez Anna, mamm-goz ar Vretoned,
Dalhit en on touez ar ouenn euz ar Varzed ;
Grit m'o gwelimpl bemdez muioh-mui o stankaad.
O ! Doue, klevit va mennad !...

⁷ ar brezel : notenn el leor orin : Brezel en hini ne dleer kaoud evid armou nemed ar gomz hag ar bluenn.(Klaoda).

Netra na dalv va Breiz !

(D'ar Barz Erw. Berthou, Alhweder Treger).

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel,
Diazezet gand kalz a dud santel ?
Ar hantvejou, 'vel bandennou brini,
Heb he diskar, o-deus nijet dreizi.

Klaskit eul leh heñvel ouz Breiz-Izel,
En hini 'chom, en despet d'an avel,
Kredennou sakr oberourien or bro,
Korvigellet oh giziou an dero !

Ha bez' ez eus eur vro 'giz Breiz-Izel,
El leh ma kan ar barz a vouez uhel,
Gand an delenn, evel an drouiz koz,
Koulz hag en neñv êlez ar baradoz ?

Ha bez' ez eus, ouspenn e Breiz-Izel,
Eur yez ken koz, ken kaer ha ken santel,
Gand ar Gelted komzet daou vil bloaz 'zo,
Hag enoret ganeom-ni c'hoaz hirio ?

Ar Hallaoued, siwaz ! gwir a laran,
D'ar Brezoneg a ra brezel bremañ,
Hogen, Breiziz, Doue a-du ganeom,
Ouz ar gwasker kaloneg enebom !

Nann, a-dra-zur, n'eo ket eun den marveg
A ziskaro e Breiz ar Brezoneg !
Eur boblad tud n'hell beza dispennet
P'eo ar memprou etrezo unanet...

Ha bez' ez eus eur vro 'vel Breiz-Izel,
Leh ma kaver labour kaer ar gizell,
E pep parrez war vein an ilizou,
Er berejou, war galz a galvariou ?

Ha bez' ez eus eur vro 'vel Breiz-Izel,
Roas buhez da gant den a vrezel,
Brudet evel Lez-Breiz ha Richemoñ,
Gwesklin, Arzur, Pontkalleg ha Klisoñ ?

En da istor, o ! va bro Breiz-Izel,
Me 'gav barzed evel ma'z oa Luzel,
Brizuk, Ar Skour, ar flabenner Milin,
Heb ankounaad, en amzer goz, Marzin.

Ha komz a rin euz a zent Breiz-Izel,

Hag a skignas sklêrder an Aviel
Dre ar vro-mañ, en denvalijenn c'hoaz,
O planta don war bep torgenn ar groaz ?...

Netra ne daly, ha netra ne dalvo,
Va Breiz-Izel, va Mamm garet, va bro !
Va harantez, beteg eur va maro,
Heb ehana da veuli me 'garo !.

*Notenn gand Embann an Hirwaz : Ma welfe an traou bremañ, e cheñfe , sur a-walh,
e vennoziou !.*

Breiz, Brezoneg ha Feiz

(D'an Doctor Piquenard, ar Barz Melen)

Beza zo tri ger kaer, c'hweg meurbed d'ar spered,
Hag a ra d'ar galon tridal gand eürusted,
Pa 'm-eus o lavared e santan evel mel,
Seblantoud a ra din kleved kana eun êl.

Breiz, Brezoneg ha Feiz, Treinded ar gwir Vreizad,
E *Gredo*, e armou da vare ar stourmad :
Setu, heb fazia, nerz meulet or gouenn goz,
Beteg eur pennad zo m'eo deuet warnom an noz.

Breiz-Izel eo ar Vamm.- O ! pebez Mamm dener !-
Pegement eo bet mad bepred en or heñver !
Gwelom an degoueziou he-deus lezet ganeom,
Hag oll bemnoz dezi a bouez or penn, kanom.

Or Mamm 'eus bugale : ar *Brezoneg*, ar *Feiz*,
Koz braz int evelti, koz braz hirio an deiz.
Tud zo a en em bli oh o lared maro....
Fazi, va zudigou !... Beo int... Int a vevo !...

Doue a zo ganeom. Penaoz keid amzer 'zo,
E chom ar Brezoneg buhezeg 've ma'z eo ?
Keit, pa daolom eur zell war gartennoù ar bed,
Nag a yezou maro, pe gand re all mesket ?...

Gwir eo eur brezel kriz warnom dirollet,,
Dond a ra euz Bro-Hall eun avel pennfolet,
Ouz or yez venniget ar Gall 'zo e kounnar...
A ! mar gallje d'an traoñ ar Brezoneg diskar !...

Nann, nann, fazia 'rit, va hredit, tud dizakr ;
Setu eun arme greñv en-dro d'or madou sakr ?
Ar Vreiziz 'zo kaled evel mein an aochou,
Evel ar gwez dero ken stank en or hoajou.

Kleved 'ra lavared, - hag her hredi a ran, -
éAr Feiz a zo lasket ! » Sklêr eo da beb unan.
An deñved 'zo taget gand bleizi gouez naoneg ;
Peleh ema 'r penn-kaoz ? e peleh an abeg ?

Teir eienenn, me 'gred, da gement-se a zo,
Heb aon, hep kasoni, amañ m' o disuillo ;
Evid or Mamm-Vro Breiz, mantrusa gwaligner !
A sko ken dizamant warni e peb amzer.

Ar politik direiz, evel eul loan gouez,

He-deus pelleet ar peoh, lazet an unvaniêz ;
Eur gasoni hwero e skoliou on amzer,
'Eneb ar Brezoneg er bugel a ouezer.

Ha komz a rin ouspenn euz ar gizioù ar Gall,
A hounid or mêzioù heñvel ouz eun atamm-gouli ?
Bragou braz ha chupenn a vez greet fae warno,
Koefou evel e kêr a ranker kaoud hirio !...

Pep hini 'oar ervad ar Brezoneg, ar Feiz,
A beb amzer a zo Breur ha C'hoar en or Breiz ;
Dre ze taga unan a zo skei war eben ;
N'int ket heb gouzoud on oll enebourien.

Ha gwelit goude-ze penaoz e savarer :
Koueriaded, bet er skol eur pennadig amzer,
War dachenn ar marhad a zraill tammou galleg,
Mez o-defe diskouez e ouzont Brezoneg.

Trehet war gement-se 'teuer a-nebeudou
Da zilezel ar Feiz, feiz nerzuz on tadou ;
Setu eno, Breiziz, setu ar spered gall,
Setu petra 'vefom, ma ne garom diwall.

O ! va henvroiz ker, diwallom da rei dorn
D'an enebour da skei kreñvoh war an askorn ;
Ouz yez koz ar Gelted stagom 'ta muioh-mui,
D'ar Brezoneg enor ! Pep hini en e di !...

Yez Vreiz-Izel

Ar brezoneg

(Priz kenta e Kenstrivadeg Gwengamp 1900).

D'am skolaerien.

O ! Brezoneg, va yez, o ! yez meurbed karet,
Eet ken don em halon, ha ken stard em spered,
E pel e kavin kozmou a-walh c'hweg
Evid ho meuli, Brezoneg !

Eur yez a zo labour tenn ha paduz eur ouenn,
Oll o-deus kalz poaniet d'he ober da viken ;
Bez'ez eo a eur bobl eur wir grouidigez
Greet ouz he heñvelidigez.

Bez' ez eo al leor beo en hini 'deus lakaet
Istor he soñj skrivet ha d'he lignez fiziet,
Eur ster vraz vurzuduz hag a dreuz an oajou
Evid mond beteg on tadou.

Eur yez eo leh santel en hini 'n em gaver,
Ma pokom, tenerraet, gand ene on zud ker,
A zo maro brudet, bremañ 'z eus pell amzer,
Hag a vev dre o yez ken kaer !

Pebez dudi soñjal : « Va zadou koz gwechall,
Amañ, war douar Breiz, disparti diouz Bro-Hall,
A gomze 'r Brezoneg evel m'her gran hirio,
E gare, e veule atao !

Den ebed en or Breiz na dle heb 'beza mezuz,
Dianaoud eo or yez eul lodenn dalvouduz ;
Ha siwaz ! pa varvo peb Breizad a gollo
Kaerra pinvidigez e vro.

Gouzodu a reer dre-ol Brezoneg hag ar Feiz
A beb amzer a zo Breur ha C'hoar en or Breiz !
Ker gwir eo kement-mañ ma ne weler eun den
A garfe unan hag eben.

Eur brezel kriz meurbed a reer d'ar Brezoneg,
Disprizet, gwallhaset eo gand tud diaouleg ;
O veza n'hellont ket dihriesienna ar Feiz ;
A glask laza yez koz or Breiz.

Tud diskiant ma'z int, laret 'deus etrezo :
« Taolom an dismegañs, taolom gwel ar maro

War ar Brezoneg-se a garont 'vel o Feiz,
Euz an oll galon 'zo 'n o hreiz.

Pa vim en em gavet da ober dilezel
Yez koz ar Vretoned, neuze gand an avel,,
Ni 'welo o feiz kreñv 'vond kuit a-nebeudou,
Evel kiziu mad o zadou ! »

Setu aze, Breiziz, ho soñj, ho c'hoantegez :
Ha felloud 'rafe deoh, dre ho leziregez,
Rei skoazell d'an dud fall, trei kein d'ho Prezoneg,
War zigarez deski 'r galleg ?

En ho sav, Bretoned, Breiziz pennou kaled !
Larom a bouez or penn : « Ar Brezoeng, bevet !
Ni e gomzo bepred beteg eur or maro...
Bebet ar Brezoneg atao !...

O ! ya, dalhom d'or yez, evel d'or penn-baz !
Ra zeuy ar vistri-skol, dreist pep tra war ar mêz,
Da zeski d'ar baotred, d'ar merhed, ar galleg,
Mez bepred dre ar Brezoneg.

Alo, bugale Vreiz, hag a zo desket mad,
Er hêriou, en dachenn, er foar hag er marhad,
Na ruziet ket a vez o komz ar Brezoneg,
Diskouezet ez oh kaloneg !

Dalhit soñj mad arao ez eo ar Brezoneg
Eur yez evel eun all, eun teñzor talvoudeg,
Deuet a-dreuz kantvejou, roet deom gand on tadou,
'Vel ar haerra euz o madou !

Bleun nevez

(D'am mignon K. Gourvez.)

War an douar enor, bennoz,
Peoh peurbaduz er baradoz,
D'ar re n'esperont ket o foan
Evid sevel yez ar vro-mañ.

N'hellet ket nah, e Breiz-Izel,
Ar Brezoneg, gand ar brezel,
A zeblante tohor meurbed,
Ha prest da veza sebeliet.

Setu abaoe bloaveziou
Tud a galon, a-vandennou,
Diwanet e pep korn a Vreiz,
O stourm oh amzer ha tud kriz.

Dre hras Doue o labourou
A zoug deliou koant ha bleuniou ;
Ha Brezoneg a zo karet,
Kanet, meulet ha kalz skrivet...

Ar brezoneg atao !

(D'an A. Mouellic, Mestr-skol).

Breiziz 'zo bet a-viskoaz gwazed pront ha nerzuz,
Ha pa redont d'an emgann int peulvanet spontuz ;
Outo netra n'hell herzel, treh a rankont beza :
O feiz, o hardiegez a ra d'an oll krena.

Breiziz a zalh d'o gizioù gand eun doujañs veuluz ;;
Mond a reont d'ar pardonioù ha d'ar foarioù trouzuz,
D'an eureujou, d'ar festou, oh son ar biniou ;
O dillajou a viront, o yez, hag o gwerzioù.

Eun arouez a ziskouez kaleter ar Breizad,
Ha pegement eo nerzuz ar ouenn en he Broad :
Ar Brezoeng 'zo karet, hirio evel gwechall,
A zo komzet en despet da gasoni tud dall.

Alo, harzit ho kwalah, o ! tud diskiantet,
Ar gounid n'ho-po morse ; Breiziz na nahint ket,
Na nahit ket o zadou, nag o gizioù santel ;
Ar Brezoneg 'vo komzet ; d'or bro ni 'vo fidel.

O ! santez Anna Wened,
Mamm-goz ar Vretoned,
M'ho ped , mirit Breiz-Izel,
Warni taolit eur zell.'
Dalhit stard en on touez
D'or yez, gwir garantez,
Ma karim bro ha Doue
E-pad on oll vuhe'.

Tristidigez ha ged mad

(D'an Aotrou De L'Estourbillon, Kannad ar Morbihan, Renner Kevredigez Broaduz Breiz, kinniget gand doujañs.)

Euz a bep korn a Vreiz-Izel
Z sav, douget gand an avel
Keleier doaniuz, forz klemmou,
A wash siwaz ! or halonou,

Eur brezel kaled ha diaouleg
'Zo greet d'or yez, ar Brezoneg ;
Mall eo ganto hen diframma
Digand bugale ar vro-ma'.

An diaoul e-unan ; a dra zur,
A hwez an tan en dud distur,
O has dre bevar horn ar vro
Da leda anken ar maro.

Kement tra vad : Bro, Feiz ha Yez,
A zo breset mar deo truez !
Karantz ebed mui enno,
Leun int a gasoni hwero.

O ! va Doue, peleh emaoñ ?
Diskouezet ho kalloud pelloh...
Re hir amzer an dud fallagr
A wallgas or madou sakr.

Doue na zilez ket or bro,
Beuzet, siwaz ! en he daero',
Dibabet 'n-deus tud kaloneg,
Da zivenn mad ar Brezoneg.

Mil bennoz deoh, o ! va Aotrou,
Keid hoh oll vadelezou
E-keñver or bro Breiz-Izel
A zo bet deoh atao fidel.

Setu eun nebeud bloaveziou
Ma vez greet kenskrivadegou
Evid dougen ar varzed taer
Da labourad or yez ken kaer !

Paotred yaouank euz ar gwella,
Dre gant e ranker o hounta
A gas beb bloaz, e Brezoneg,
Gwerziou koant dar genskrivadeg.

Or halonou a laouenna
Pa welom an dud gouizieka
O poania stard evid or Breiz,
Dre ma wasa d'ar brezel kriz.

Ar Brezoneg 'zo enoret,
Ha dre-oll muioh-mui komzet ;
On tadou-koz, en o beziou,
A drid bremañ o halonou.

Ra vevo gallouduz ha pell
Kevredigez or Breiz-Izel !
Pell anavezet ra vezo,
Euz eur penn d'ar penn all d'ar vro...

Nann, nann, va henvroiz karet,
Or yez ne vo ket diskaret,
Ne varvo ket ar Brezoneg
Tra vo e Breiz tud kaloneg !...

War zav !

(D'an Aotrou Perrot).

Na me 'garfe e ve va mouez
Klevet e Breiz e pep parrez !

O ! va bro ger a Vreiz-Izel,
Bro ar Varzed, douar santel,
Ar Gall a hoanta touella
Da vugale 'vid o zrella.

'Vid laza da spered kristen
Ennout eet ken dous he hrizien ;
'Vid laza da yez venniget,
A garfe gweled dilezet,

'Vid laza da gizioù brudet,
Pennabeg euz da eürusted ;
Gouzoud a ra ema aze
Buhez, pe varo da ene.

War-zav, war-zav, oll, Bretoned,
Gouenn an dud kreñv, pennoù kaled !
Penn d'an enebour aheurtet !...
Biken gantañ na vim trehet...

Biken or yez ne vo lezet
Da veza e Breiz diskaret,
Da Zoue ha d'or Breiz-Izel
Oll bepred e vezim fidel...

Kentoh 'karfem mervel mil gwech
Eged rei abeg d'eur rebech !

Ar Vretoned hag o gwaskerien

(D'an Aotrou Ar Berrre, Barz Abalor)

Ar waskerien

Ar Brezoneg prim d'ar maro !
Hiviziken de n'e gomzo...

En ilizou hag er skoliou,
D'ar galleg oll, va zudigou.

Ho peleien pa brezegint
Galleg flour deoh a zistago⁸.

Mestrezed ha mistri skoliou,
Grit e galleg katekizou.

Na fell mui deom a zeurezed
Muioh 'plij deom dimezelled.

Hag ar Vreudeur n'ouzont netra (?)
'Vo lakaet er mêz euz o zra.

C'hwi, Bretoned, tud a hiz koz,
'Zo e teñvalijenn an noz.

Evel ho preudeur Gallaoued
Plegit ho choug heb grig ebed..

Bezit dineh, na glaskom ken
Nemed rei deoh gwir sklêrijenn.

Ar Vretoned

Tavit, tavit, tud divadez,
Paouezit pelloh ho sklabez.

Re bell, siwaz ! oem touellet,
Hag edom oll evel trellet.

War on daoulagad eur ouel du
A zo bet ledet ganeoh-hu.

Siwaz ! deom-ni na gredem ket
Or madou kement gourdrouzet.

Ar Vretoned n'int ket maro,

⁸ zistago : a zistagint, : eur fazi yezadur dleet d'ar galleg, er skrid-orin.

Nerz-kalon a zo c'hoaz enno.

Pa vezim kaset beteg penn
Ni 'zavo oll d'en em zivenn.

A-vremañ e tisklêriom freaz :
D'or Brezoneg trei kein biskoaz !

D'ar veleien, d'ar feiz wirion,
Karantez 'zo en or halon.

Ar Brezoneg koz hag ar Feiz
A zo Breur ha C'hoar en or Breiz.

O gwriziou 'vel re an dero
A zo korvigellet er vro.

Tud divergont, lezit ar peoh
Gand tud ha na laront grig deoh.

Pe dizale koulz ha gwechall,
Ni 'gavo bizier ha traou all.

Er baradoz

(*D'am Breur Louis, Merdead.*)

War don : Les sabots de la Duchesse Anne.

En noz all edon en heroez⁹,
Kousket, eur zulvez,
Gand kenvreudeur merdeidi,
Gwaskedet on-tri ;
Hag e ris eun huñvre souezuz,
Dond a ree euz Êlez Jezuz
A ! A ! A !
Selaouit an hunnvre mañ !

Tost da Ber on o hortoz
‘Barz ar Baradoz,
Pa lavaras Doue dezañ :
« Porzier al leh-mañ,
Diwall oh paotred Penn-ar-Bed,
Setu eun toullad o toned,
Tud a vor
A deu da houlenn digor !

Ra helli, Per, heb marhata
Ervad o ranna !
An nor aour digor ar vrasa,
E-leh he serra,
D’ar re eve re vanneou
Kalz ane’ ‘zo war an hentchou !)
O ! O ! O !
Ni ‘welo petra ‘zegouezo ! »

« Deuit afo, ‘me ‘r porzier koz,
Deuit er Baradoz !
Deuit oll, paotred ar gwin-ardant,
Evel ma ‘m-eus c’hoant !
Ar re all ‘chomo da zelled
‘Kichenn an noz vraz alaouret,
E ! E ! E !
Hep koll kalon evid-se ! »

« Mad e’ ya ! ‘laras¹⁰ da Ber
Al liperien gwer...
Setu fin poaniou ar bed,,
Mui ‘med eürusted !

⁹ heroez : harozez.

¹⁰ heroez : larjont, er skrid orin.

Deom a-raog 'n oll, mignoned
Deom, ar "rad"¹¹ a rankom gweled !
A ! A ! A !
Hastom mond da ebata !...

Hogen, dizale sav kruz
'Barz ar Baradoz ;
Kleved a reen trouz ha savar,
Gwir ez oa glahar.
Hegasi 'reent ar heuz sant Per,
Defot na zegase dezo gwer,
O youhal :
« Gwin-ardant evel gwechall. »

Hag e larent d'an den-Doue :
« Penaoz an dra-ze ?
N'eus ket zoken er Baradoz,
'Giz en or bro goz
Eun tammig ostiz, 'vid arhant,
Da rei eur banne gwin-ardant !...
A ! A ! A !
Ni a ra da zouara !...

Glaharet oll gand an istor :
« It d'ar Purgator ! »
A laras dezo sant Per,
Koulskoude tener,
C'hweh mil bloaz eno o tomma,
Deoh gwin-ardant rey divoaza,
Rag ama'
E reer fae war an eva !... »

Setu ar wazed poelluz
War-dro ar sant eüruz,
Pokad da draoñ e zoudanenn.
Oll dre o fedenn
E halvent madelez sant Per,
Da rei pardon d'o breudeur ger,
Kondaonet
'Vid beza ker fall komzet !

-« Dizoñjal 'ran o flamm garo,
'Laras Doue d'e dro,
Deuit eta, c'hwi, em eürusted,
Deuit oll, Bretoned,
Eüruz an dud a galon vad
O ! ya... Ren a raint gand o Zad ;
Me 'fell din,

¹¹ rad : ?

An neñv ganto a rannin...

Goude, Per, ar zant ken mad,
Lar gand kalonad :
« Pedit, pedit, mignoned,
‘Vid ho tud dallet,
Ma labourint da ziwaza
Deoh an evaj ‘deu d’o laza :
Korv hag ene ;
Av zelaouit ‘n an’ Doue ! »

War an dra-mañ ma pon divunet,
Tost din ‘m-eus kavet
Dour a varo, eur voutaillad !
A ! va hredit mad !
Goude an huñvre, ar marvaill
M’em-beus kroget prim em boutaill,
Nom de nom !
He stlapet ‘m-eus er mor don...

(Greet e galleg gand Taillevent).

Pedom an Intron Varia

(D'an A. Berthou, Person Lanvizio).

War don : *Plahig Enez Eusa.*

Diskan

Eun arne spontuz a dosta,
Pedom an Intron Varia ! *(diou wech).*

O ! na teñval eo an dremmwel !
Koumoul karget a zo a-bell...

A bep tu e klevom hirio
Youhadennou dispah er vro !

Lavaret e ve eun arme
Kaset da ober eur bale !

Eur bale evid distruja
Kredennou koz tud ar vro-ma' !

Iliz Jezuz 'zo gwallgaset
Gand enebourieb bennfollet.

Garo meurbed eo ar brezel
A reer hirio d'an dud fidel.

Emaint o klask, er vugale,
Mouga 'n doujañs evid Doue.

Harpom omm or skoliou kristen
O rei laouen or gwenneien !

Bagig sant Per a zo hijet
War eur mor spontuz dirollet !

Kristenien, braz 'vezo ar reuz,
Ma n'enebom heb ober neuz !

Eur steredenn er gwall-amzer
A ro kalon d'ar beajer.

Mari eo steredenn ar mor
D'ar gristenien eur gwir houdor !

Stouet dirag aoter Vari,
or Halon baour o hlahari,

Pedom an Intron Varia
Ma viro 'n arne da darza !

Bet soñj euz an anaon

E koun euz va mignon Comomban L.

Soñjit en ho tad, en ho mamm,
Er purgator, e-kreiz ar flamm,
(*Kantikou Eskopti Kemper*)

War don Kelven¹²

Tan ar huz-heol a varve dre-oll a-nebeudou,
Gwel du an noz 'n em lede war gern ar menezioù,
An êzenn skañv a skrije e-touez ar yeot, en traoñ,
Hag a lavare klemmuz : « Bet soñj euz an Anaon ! »

Ar gwenan 'oa dizroet en on holoennou,
Al laboused 'oa kousket e donder ar skourrou ;
Eur zioulded velkoniuz a waske ar galon ;
Ar hloh en tour a gane : « Bet soñj euz an Anaon ! »

E bolz an neñv ar stered skeduz a lugerne,
Avelig dous ar hreizteiz er gwez sapr a varve,
A varve 'n eur hrozmolad gand eur vouezig a gaoñ¹³ ;
« O ! c'hwi hag on-eus karet, bet soñj euz an Anaon ! »

« E-giz moked tano a zav euz an doenn,
Pa zav an heol beb mintin, ha ne weler mui ken,
Evel an êzenn skañvig marvet er geunioù don,
E termennoù o deizioù : « Bet soñj euz an Anaon ! »

Ho-pet soñj euz an Anaon ! Euz ar re n'emaint ken,
Hag hoh-eus darempredet, deh en ho kêriadenn ;
Du-hont o beziou glazet, e skeud an tour krignet,
A zo ganeoh dilezet, er vered venniget.

Goude eur ged frealzet gand promesaou ar feiz
O-deus kuitaet ar bed-mañ ; c'hwi 'ray 'velto en deiz...
Ho puhez a dremeno evel bokedig
Bleuniet ker koant er beure, goeñvet d'ar pardaezig.

An devez labour echu, re all ivez d'o zro,
O vond dre 'r gwenojennou menezioù kaoñ a glevo ;
Kloh skiltruz ar glaz ivez a laro d'o halon :
« O ! c'hwi, hag on-eus karet, Bet soñj euz an Anaon ! »

¹² Kelven : ?

¹³ gaoñ : gañv.

Nouel nevez

(D'an Aotrou A. Lajat, "Mab ar Argoad")

Ra vo meulet e peb mare,
Hag euz eur hantved d'egile,
An nozvez meurbed benniget
En hini¹⁴ Jezuz 'zo ganet.

Mari ha Joseph, e Bethleem,
O-deus klasket, heb en em glemm,
Eul lojeiz evid an noz
Er gêrig-se euz o zud-koz.

Disprizet gand kerent memez,
En abeg euz o faourentez,
An daou bried santel heb dor
A rank koulskoude kaoud goudor.

O veuli bolontez Doue
Ez eont er-mêz a gêr neuze,
'Vid moned en eur hraou dister,
Digor a bep tu d'an amzer.

O ! tra souezuz braz meurbed !
Ab Hini a groas ar bed
Ne gav ket zoken degemer
Gand tud hag a breno ken ker !

E-kreiz an noz steredennet
Ar hraou a zo sklêrijennet ;
Mari, bepred Mamm ha Gwerhez,
Da Jezuz Krist a ro buhez.

War eun dornad plouz astennet,
Gand dillad e Vamm mailluret,
Jezuz d'e gerent 'vousc'hoarze
'Giz heol ar beure er mene'.

Mabig Jezuz, an drugarez,
Na c'hwi 'zo din a garantez !
En em hreet den evid an den,
Piou n'ho karo hiviziken ?

Gortozet 'pad pevar mil bloaz,
Donedigez ar Mesiaz
Na helle chom eun dra guzet,

¹⁴ En hini : E pini, er skrid orin.

Setu penaoz 'oe diskuillet...

An neñv souden 'zo digoret
Hag an êlez a zo nijet,
O kana dre o hantikou :
« Gloar da Zoue 'barz an neñvou ! »

D'ar bastored, gand o deñved,
Ez int neuze 'n em ziskouezet,
E-kreiz eun tarzad sklêrijenn
Hag a ro dezo krenienn.

« N'ho-pezet aon, eme eun eal¹⁵,
Leh hoh-eus hirio da dridal ;
E kêr David ez eo ganet
Jezuz ar Mesiaz gedet.

Ha setu e peseurt doare
E kavot ar Mabig-Doue :
En eur hraouig paour, gourvezet,
E welot laouen astennet... »

D'an ampoent e klevjont ervad :
« Peoh d'an dud a volontez vad ! »
Pegement ez eo dudiuz
Ar gomz-mañ war gavell Jezuz !

Sammet ganto bet a oanig,
Ar bastored a gerz prestig
D'o hinnig d'ar Mabig Jezuz,
A gavont er hraou burzuduz.

Harz treid ar bugel degouezet,
Kerkent d'an daoulin int kouezet,
Oh hen anaoud 'vid o Doue,
O Mestr, o Zalver, o Roue.

Mabig Jezuz, bugelig koant,
N'hellan ket deoh-hu rei arhant ;
Hogen, kemerit va halon
Renit da virviken warnon !

¹⁵ eal : stumm Leon evid ar rim

Maro ar breur Yann en Eusa

(Kinniget d'e gerent)

War don : *Mab den, soñjit.*

Dreist ar mor braz, du-ze er gwagennou,
Me 'glev hirio son klemmuz ar glazou...
Petra, Eusiz, preta 'ra deoh gouela ?
Perag ken trist ar halonou brema' ?

Me 'wel e kañv iliz-veur ar barrez,
Gwisket e du eo oll dud an enez ;
Tristidigez a weler warnezo...
Livrit din : Piou eta 'zo maro ?

Daoust ar person, pastor oh eneou,
Pe ar mêt mad, divennour ho kwiriou,
'Zo bet skoet, diskaret didruez,
Evel ma vez kalz a re all bemdez ?...

Hag e klevan, a-dreuz kalz a zaelou,
Oll dud Eusa, unanet o moueziou,
Oh hirvoudi war-zu tud an douar,
O lavared gand ar brasa glahar :

« Kemerit perz en on zristidigez,
Rag ar breur Yann, de n leun a garantez,
Eiz vloaz 'zo bet o ren skol ar baotred,
Siwaz ! deom-ni, ar breur Yann 'zo marvet !

D'or bugale, ar breur Yann 'oa eun tad,
Kalon dener, gand se eur mestr-skol mad ;
Dezo 'teske êz an oll skiantchou,
Ha dreist pep tra mired feiz o zadou.

Bez 'oa pall zo mignon pep tiegez,
D'an dud vehiet gwir frealzidigez,
Nikun biskoaz na dehas dioutañ
Heb lavared : « E lod en-deus em foan ! »

Ya, eneziz, leh hoh-eus da geuziñ
D'ho Preuer Rener, an den kelaoneka ;
Hogen eun dra 'chom c'hoaz deoh da ober :
Pedit 'vitañ bemdez harz an aoter.

Kalonou paour, taolet ha distaolet
'Vel ar vagig war ar mor kounnaret,
En em daolit e Kalon Zakr Jezuz,
Eienenn hlan eürusted peurbaduz.

E)barz em hreiz, va halon 'zo kousket
Em daoulagad daelou puill 'zo savet...
A ! me ivez, me 'gare ar Breuer Yann,
E kañv an oll va ferz a gemeras.

An Ankou kriz gand e falh diremed,
A sko bemdez koulz a-dreuz hag a-hed...
Kerzed a ra dreist ar mor fuloret
Evel war zouar dre an hentchou kaled.

Morse truez nag evid tad, na mamm,
Beleg, pried^o gantañ espernet tamm.
Meneh devod, kerkoulz ha tud ar bed,
A rank d'o zro mond da jom er vered.

Setu, Breur, oh galvet gand Doue
Da zsikuiza 'hed an etrnite ;
'Vid labourou inouüz braz ha tenn
Eur gurunenna luho war ho penn.

E gwered koz parrez Sant Evarzeg,
Tost d'ar porched, en eur bezig meinek,
'Ma korv ar Breu o hortoz deiz ar varn ;
Plijet gand Doue dond en deiz-se d'or gouarn !

Bep sul, beb gouel, war-lerh an overenn,
E vignoned a yelo 'n eur dremen
Da lavared beb a *De profundis*
'Vid e ene... *Lux luceat eis !...*

Gwerz war vuhez hag oberou an Aotrou Markiz a Germaker (1815-1895)

(D'an A. Ar Garrek)

War don : Al Labourer (Barzaz Breiz)

E tu kuz-heol da Vro-Hall ez eus eun douar bennag,
Treuzet gand diou jadennig menezioù krenn meinek,
Fouetet gand dour ar mor braz, goloet a groazioù,
Chapeliou hag ilizou, savet gand on tadou.

An dud a vev er vro-ze a zo kreñv ha kaled,
'Vel n'ez eus ket er broiou hirio darempredet ;
Derhel a reont d'o gizioù, d'o yez koz ha d'o feiz,
Anvet em-beus ar vro-zê : Breiz-Izel, va bro Breiz

Mad ! er vro-ze benniget, demdost da Gemperle
E kastell Plessis-Nizon, c'hoaz La Villemarqué,
Er bloz mil eiz kant pemzeg, euz eur ouenn enoret,
A roas dezañ gwad yah gand eun ano brudet.

Ar beorien, ar re boaniet, a gave degemer
gand an Intron galoneg, perhennez ar maner,
Dre labour ha kalz aked e rentas ar yehed
D'eur baourez kêz kanerez n'he-doa mui kar ebed.

Houmañ, dre anaoudigez, a gane d'an Intron
He haerra kanaouennou gand karantez wirion ;
Dran anezo 'zo chomet e-pad meur a vloavez
E maner koz Kermarker, 'n eul levr keginerez.

D'an oad eur bloaz warn-ugent, La Villemarqué a ya
Da skol vraz an diellou gand youl da studia ;
Unanet gand mignoned yaouank ha kaloneg,
E reas eur vad souezuz dre galz skridou gouizieg.

'Touez e labourou kenta e kavom eur studi
Diwar-benn "*Bosenn Elliant*", hag a ra diouti
Ar pezh a goun Theodor euz ar barzoniez e vro,
Ar pezh a hoanta ober, an hent a gemero.

Gweled a reer, d'an ampoent, e labourer dija
War e levr *Barzaz Breiz*, al levr duidiusa,
Pe oe greet dezañ 'n enor gand ministr ar studi
Da voned beteg Bro-Zaoz evid eur gefridi.

An oll hañvez ar gouelioù kaer ha dispar a vez
Beb bloavezh e Bro-Geumry evid enor ar yez.
Gand peg braz levenez o gwelas Theodor,
E santas e garantez o kreski 'vid Arvor !

Êz eo entent al labour gand Theodor boulhet
Evid dastum en eul levr Barzaz ar Vretoned :
Gwerziou ha soniou fentuz, kanaouennou seder,
Abaoe meur a gantved kanet e pep karter.

Bloaz goude m'oa dizroet, e hane *Barzaz Breiz*,
Eu levr leun a ouiziegez, a garantez, a feiz !
Eu levr euz ar re gaerra a zo bet greet biskoaz,
Hervez testeni uhel kalz a dud desket braz.

Piou 'lavaro levenez an oll gwir Vretoned,
Ha zoken ar zouzenn euz tud gouizieg ar bed,
Pa weljont al levr dispar, Èen din a deuleudi,
'Uz d'or bro ger Breiz-Izel 'vel heol o lugerni !

Hersatrt de la Villemarqué 'oe skoet e galon
Gand lidou leun a veurded, goueliou braz Iwerzon,
Gouestlet evid enori Barzed ha Brezoneg,
Ivez evid unani an oll Vreuder geltieg.

Dre labour ar gwir Vreizad, er gêr a Zant-Brieg,
Eur bloavez e oa gwelet Bretoned kaloneg,
Euz pevar horn Breiz-Izel, euz Breiz-Tramor zoken,
Gand karantez virvidig unanet da viken.

Pell e oa La Villemarqué gand e Intron nehet,
A wele sklêr o fallaad he nerz hag he yehed
Dilezet en-devoa krenn an oll lehiou trouzuz
Evid entent ouz e wreg, ar vaouez spereduz.

An Intron La Villemarqué a-pad ma'z oa bet kreñv,
'Oa evid ar skrivangner eun nerz, eur sklêrijenn ;
Er bloa deg ha tri-ugent e varvas pell diouz Breiz,
O teuler oll er glahar tiad tud ar Markiz.

Euz maner koz Kermarker eh heulie labourou
Tud gouizieg, tud a furnez, o vale 'n e roudou ;
Gwele 'ree gand levenez an had gantañ skuillet
O tiwan, hag o tougen bleun ha frouez furmet.

Eñ en-doa da genta d'an bed-oll diskuillet
Teñzoriou barzoneg Breiz beteg neuze kuzet ;
Hag eno, a-nebeudou, evel en eur feunteun,
Bro-Hall ha broiou estren a glaske 'r sklêrijenn.

En diwez La Villemarqué a guitaas ar bed-mañ
D'an eiz euz a viz Kerzu, nao bloaz a zo bremañ,
A-douez an dud a gare, e maner e dud-koz,

Evid moned, a dra-zur, war-zu ar Baradoz.

Ni on-deus leh da gredi ez eo Hersart eüruz,
A-vihanig a kare pedi 'r Zalver Jezuz,
Beteg an deiz diweza, daoust ma'z oa dinerzet,
E lavare an ofis en e levr melenet.

Keuziom eñ oll, Kenvroiz, keuziom on divennour,
Dalhom beteg an diwez koun or madoberour ;
Pedom an Aotrou Doue da zegas en or bro
Tud gouizieg heñvel outañ, a ray ar vad d'o zro.

Maro eur Breizad yaouank

(D'am hoar-gaer Marc'harit G...).

Jopig ar Gall a zo gwall-glañv
Abaoe ma'z eo deuet ar goañv ;
E vmmig paour en e gichenn
A zo behiet gand an anken.

Teodou merhed a ya en-dro
Da hortoz ma teuy ar maro ;
A bep seurt traou o-deus gwelet
Abaoe m'eo Jopig klañvet.

« Me 'm-beus klevet e-pad an noz,
Labous-skrijer tost d'an ti koz,
O teuler e skrijadennoù :
Jopig a varvo en deizioù !... »

« Klevet em-beus o wigoura
Karrig an Ankou dre ama' ;
Heuillet gand kalz a dud varo,
Ez ee 'vid sur da Gêrharo ! »

Ar vammig kêz a zo pleget
War he bugale alteret :
« Va mabig ker, an hañv hirio !
A-barz nemeur te 'bareo... »

« Mammig... Êlez ar Baradoz !...
Ar Werhez wenn ouz va gortoz !...
O ! mamm, va fenn !... Na me 'm-eus poan !...
Al liñseriou... An arched moan !... »

« « Lak 'ta da benn, va mab Jopig,
War va halon eur pennadig ;
Kalon eur vamm eo 'r penn-wele
Ar soupla 'vid he bugale... »

Antronoz pa darzas an de',
Ar paotrug yaouank a varve ;
An oll a lavaras gand feiz
Evitañ eun *De profundis*.

*

D'ar meurzh vintin pa zave 'n heol
Al laboused a oa mud oll ;
Boked ebed oh ar hleuziou,
E neb leh war bord an hentchou.

Ma klever an hekleo a-bell,
Pedennou an Iliz santel,
O kas d'ar vered an arched,
Gand pevar den yaouank douget.

Skourrou ar gwez, pa dremene,
'Uz d'al liñser wenn a blege,
Evid diskouez ivez o hañv
D'an neb a varv e boulh an hañv.

Ar person koz a bede c'hoaz
Pa ehanas da zon ar glaz ;
Eur verradenn dour benniget,
Ha kenavo d'an douaret !

Mil gwech eüruz ar Vretoned
A varv, ar peoh en o spered !
O ! nann,ne dint ket tre maro,
Pa'z int douaret en o bro !

Bep sul, goude an overenn,
Ar gerent a lar eur bedenn
War beziou glaz an Anaon kêz,
A vez soñjet enno bemdez.

(Kurunet gand an Association littéraire et académique de Bretagne, 1904)

Ar wezenn hag ar zitrouillezenn

(Fablenn)

(D'am mignon Job ar Gall, e Bourh Plougastell).

Greet mad en-deus Doue pep tra !
'Vid displega 'r wirionez-ma'
Tro 'r bed n'eo ket red din ober,
Er zitrouillezenn he gweler.

Eur houëriad piz a zoñje
E teoder ar frouezenn-ze,
Ha peger moan eo he zrojenn,
Hag e savare evel-henn :
« Petar 'zoñje 'ta or Hrouer
P'edo an traou-ze oh ober ?
Ar zitrouillezenn-mañ 'vid sur
A zo lehiet fall gand ar Fur !
Arsa ! m'em-bije he hrouget
E bleñchenn eun dervenn galed,
Gwell e ve bet, e gwirionez :
Heveleb gwez, heveleb frouez !...
Pebez gaou, Fañchig, n'out ket bet
E kuzul da Zoue galvet !...
O ! ya neuze – netra sklêrroh –
Pep tra a vije bet gwelloh !
Ha perag ar frouezenn 'vez,
Ha n'eo tamm teoh eged va bez,
N'ema leh ar zitrouillezenn,
Hag houmañ e beg ar wezenn ?... »
Ar zoñj-se 'nehe 'n den faro,
A yeas dindan ar gwez dero,
En eur lavared : « Na gousk ket
Neb en-deus kement a spered ! »
Morgousket edo pa gouezas
War e fas hir, hag a gignas,
Euz eun dervenn ar *vezenn*.
Divuna 'reas oh en em glemm ;
Hag o kas e zorn war e zremm,
E kav ar *vezenn* c'hoaz rostet
Oh e varo gand gwad kaoulet...
E fri kignet a reas d'on den
Komz e)giz all hiviziken :
« O ! o ! diwada 'ra va fri,
Emezañ, 'vond war-zu e di ;
Petra 'vije 'ta degouezet
Ma vije warnezañ kouezet
Eur beh pounnerroh 'vid ar mez,
Evel ma'z eo ar sitrouillez ?...
N'eo ket falvezet da Zoue,

Hag abeg en-doa evid-se !... »
Daoust ne gaver ket aliez
Euz an dud-se en on touez ?
Ya, Doue a oar mad petra
A zo evidom ar gwella...
N'en-deus greet netar dievez,
Her gweled a reom mad bemdez.

Kroazig va gouestlou

D'am mignon I. Quélenec

E-harz an aoteriou, en deiz-se daoulinet,,
Da Grouer ar bed-oll me am-beus lavaret :
« D'oh-hu, o ! va Aotrou, me a ro va halon,
A vremañ da viken, renit warnon.

Paourentez ha Gwerhded, ivez Sentidigez,
C'hwi 'vo va friejou penn da benn va buhez ;
Ne fell din er bed-mañ nemedoh, va Jezuz,
Dasprener an eneoù, va Mestr karantezuz !

Dilez a ran a-grenn oll vraoigou ar bed,
Madou hag enoriou n'ho klaskin mui nepred ;
Keit ha ma vezin beo me 'vo deoh, va Doue,
O tougen d'ho kared kalonou 'r vugale... »

Roet ez eus dib neuze eur groazig kouevr melen,
Gand eur gordonenn zu 'vid galloud he dougen.
O ! Kroaz, va oll zeñzor, na c'hwi 'zo karadeg !
Pegement e plij din rei deoh-hu pokou c'hweg !

Me 'garo em herhenn ho tougen noz ha deiz,
Hag eur wech an amzer seled ouzoh gand feiz.
'Vid gouzañv va foaniou a gorr hag a spered
Eur zell hepken warnoh am zikouro bepred.

Dond a ray ar hleñved d'am staga em gwele,
Kroazig ker va Gouestlou am frealzo neuze,
D'al Zalver war ar Groaz 'vo va zell diweza,
Pa larin kenavo da sklêrder ar bed-ma'...

Etre va daouarn yen, pa vezin tremenet,
Va Hroazig 'vo lakaet e pleg va japeled ;
Va mignonez feal da viken am heulio ;
En arched, en douar, va hroaz ganen 'yelo.

Migonez venniget, va hemerit bepred
Eneb ar bed, ar hig, eneb an droug-spered,
Ma'h hellin, va Jezuz, o ! c'hwi va harantez,
Ho meuli d'am maro, en ho rouantelez !...

An nevez-amzer

(D'an Aotrou Y. Peron ; Mestr-skol)

Tremenet eo ar goañv kriz, an erh, an avel foll,
Hag e harz ar menezioù e par bremañ an heol ;
Setu ar vuhez adarre o tizrei e pep tra ;
Ar prajeier, an dero, a deu prim da hlaza.

Ar bokedou a ziwan, a vleugn en eun devez,
E skourrou gwez ar girzier setu deliou nevez !
Goude tri miz enouüz pebez dudi 'dremen
Dindan bannou heol skeduz tostig d'eun eiennn !

Ar hlañvour paour a zilez gand plijadur e di
'Vid kemered êr yahuz ar roz hag al lili ;
Ar vugaligou trouzuz a gar ivez c'hoari
D'ar yaou¹⁶, da zul, d'ar vakañs, dindan gwez ar vali.

Da houlou deiz, ar gwenan, ha pres braz warnezo,
A nij gand herr en neñvou, o klask ar bokedo' ;
An evnigou a labour evid ober o neiz ;
Er parkeier, er hoajou, e kanont 'hed an deiz.

Ar gwennili 'doa tehet a-raog ar gwall amzer,
Emaint dizro adarre gand ar henta tommder ;
Al loened kaset d'ar prad, a beur an dachenn hlaz,
Ar yeot tener distrempet gand gliz an neñvou c'hoaz.

Setu an nevez-amzer, setu an amzer gaer,
Dizro poent ar padoniou d'ar re¹⁷ 'z aim seder ;
Pegement e vim eüruz o vond d'ar chapelioù,
Hadet e bro Breiz-Izel evel perlezennou.

Kanom a vouez uhel, kanom oll gand dudi !
Kanom an nevez –amzer, kanom oll dizoursi !
Kanom war ar menezioù, kanom en traoñiennoù,
War gern reier on aochou, hag er balanegou !

¹⁶ D'ar yaou : en amzer-ze ne oa ket skol d'ar yaou. Lakeet eo ar "ar merher" en e leh.

¹⁷ d'ar re : da bere, er skrid orin.

Al labourer-douar

(D'am mignon Laou Ar Meur).

Ne don nemed eun tieg, o chom 'n eur gêriadenn,
E sioulded c'hweg ar mêziou va amzer a dremen ;
N'em-eus tamm dskadurez, kement-se na vir ket
Ez eo diziou leuniet euz ar wir eürusted.

Pennou braz ha pinvidig, er hêriou lojet mad,
En noz ar housk a zeblant tehet ho taoulagad,
Pa ziskuizan a-zoare em gwele koz klozet,
Gand va bandenn vugale,va zud muia-karet.

Diouz ar mintin, pa zavan – gwir eo a-raog an heol, -
Me a gav va izili ennon kreñveet oll,
Evid adarre staga el labour pemdezieg
A vago va ziadig hag ar paour ezommeg.

O todn euz va farkeier, degoueziou va zadou,
Va halon el levez, me lar : « Bugaligou,
Pegement om-ni eüruz, 'n on ti plouz dislivet !
Pedom ma talho Doue pell amzer deom yehed. »

Va deveziou a dremen er peoh ar padusa,
Pell diouz savar ar hêriou, er mêziou ar sioulla ;
Biskoaz, bennoz da Zoue ! biskoaz ar gwall gollou
Euz va zi paour ha dister na lammas an treuzou.

Evel an heol o sevel, va zal-me 'zo skeduz,
Ne vez morse roufennet gand soñjou enkreuz.
Va bugale, eun devez, pa vo deuet nerz dezo,
A labouro kaloneg an douar ivez d'o zro.

E gwirionez va labour aliez a vez tenn,
En hañv dindan heol bero, er goañv en avel yen ;
Hogen buhez an tieg, 'n despet da gement-se
A zo evel kemmesket a joa e peb mare.

Mar don gwisket gand lien, ha gand boued groz maget,
Mar deo skuizuz va labour, ha ken nebeud paeet,
Pegement eun diahouet gand êr fresk ar mêziou !
Ar yehed hag ar frankiz, kerra donezonou !

En or bro ger Breiz-Izel peb maread amzer
En-deus war-lerh al labour e ebatou seder ;
Goude an devez poaniuz, setu diskuiz an ti,
En-dro da dan an oaled, azezet dizoursi.

A-veh ma kav ar bourhiz, d'ar zul vintin zoken,

Eun hanter-eur 'peus laeret da vond d'an overenn ;
Abredig euz an arbel me 'denn va dillad kaer,
An devez sul penn-da-benn a zo oll d'am Hrouer.

Gwenn eo ar bleo war va fenn, ha setu-me krommet,
Dizale 'teuy ar maro gand e falh dir sklaset ;
Hogen, va halon a zo peurzistag a bep tra,
Gortoz a ran an termen hep keuz braz da netra.

Ar wazig dour

(Da Renner skol gristen Plougastell).

Ped gwech d'an hañv on 'n em blijet,
Pell diouz an trouz 'n eul leh kuzet,
En eur foeneg, va-unanig,
Tost d'eur waz-dour a red sioulig.

E-pad ma tev an heol bero,
Azezer dindan an dero,
Me 'zell oh an dour, hep paouez
O kas dre-oll freskadurez.

Dre zour ar wazig glazennou
A ra diwana bokedou
A bep seurt liou, c'hwez vad ganto,
Evel stered ni o gwelo...

Laboused, ho kan dudiuz,
A laka va spered eüruz,
Setu dour fresk, heb aon ebed,
Soubit ennañ ho plun rostet

Pa ho-peus ho Krouer meulet,
A dra zur c'hwi hoh-eus sehed,
Tostait eta, evnedigou,
Evit euz dour-red ar mêziou.

Preñved askelleg livet kaer
A dremen 'uz d'an doureier,
O klask freskaad o izili,
O gweled a ran gand dudi.

Livirit din, gwazig lirzin,
Da beleh it-hu ken mibin ?
Pres warnoh, morse n'ehanit,
E tu ebed c'hwi na jomit...

« Mond a ran, mignon, d'en em daol
Er mor braz, siwaz ! d'en em goll...
Evel dout na ran 'med tremen,
Heb chom da hoari en draoñienn. »

Ar gentel a ra din huñvreal ;
Va spered a nij d'ar bed all...
Pegement a dud a dlefe
Selaou ar waz evel don-me !...

Nedeleg ar glaouaer

(D'an Aotrou Grignoux, Beleg euz a Blougastell)

E koad Bokemal daou zen paour
E veve war-bouez o labour ;
O zi disterig, eul lochenn,
A oa savet war eur grehenn.

Biskoaz den n'en-devoa klevet
Klemmadenn gand hini ebed,
O-daou n'o-doa nemed eur c'hoant :
Kaoud da zevel eur bugel koant.

Goude beza pell braz pedet,
Setu eur bugelig ganet,
O tegas e ti ar glaouaer
Levenez ha dremmou seder.

Diwar neuze ar vamm dener,
War-dro ar hrouadur dister,
A veze gwelet noz ha deiz,
'Vel al labous war-dro e neiz.

Beb bloaz o-daou a-ziagent
O gweled devot er pellgent ;
Daoust, bremañ p'o-deus eun êlig,
Ha lezet 'vo e-unanig ?

An tad, eur hristen leun a feiz,
Evel ma'z eus kalz c'hoaz e Breiz,
A lare : « Doue on diwallo
Ked a veom oh ober on tro. »

Degouezet an noz venniget,
Ar halonou 'zo ankeniet...
Petra d'ober ? E pe du trei ?
Ouz pe zant en em erbedi ?...

Ar vamm dreist-oll a lavare :
« Bez(vez bleizi da beb mare
O rodellad dre ar hoad ma'...
Or mab 'vo ken êz da zamma !... »

« Bezit dineh, gwreg wan a feiz,
Ar Bugel ganet war blouz leiz,
Ked a veom fenez en iliz
E viro Jopig diou ar bleiz !...

« Pouchas prim evidom askoan,

Laka patatez war an tan ;
He 'ya da wiska va dillad
Gand aon de veza diwevad !... »

O vond er-mêz euz an ti-soul
E poulzont an ibil en toull ;
Hogen, koulskoude n'oa ket kloz,
An tammig dor greet gand koad koz.

o ! tud, an nozvez teñvalla !
Avel skornet, erh o koueza !
Nag a boan o kaoud an hent braz,
O vale warnañ muioh c'hoaz !

An overenn a oa gwisket
Pa zegouezont 'barz ar porched ;
Daoulinet en iliz kerkent,
'Vid o bugelig e pedent.

Da zaoulina ejony o-daou
Dirag skeudenn skeduz ar hraou,
'Vid saludi ar mab Jezuz,
Bugel Doue karantezuz.

Pa oe an obidou echu,
D'ar gêr e tistrojont diohtu,
E-leh mond d'an ostaliri
Da lonka gwin, d'en em vezvi...

Dalhmad, dalhmad a-hed an hent
Euz o êlig ker e komzent...
« Va Doue, mar deo bet ar bleiz
Oh ober anezañ e breiz !... »

Petra 'hoarvezas el lochenn
P'edo ar gerent en anken ?...
Siwaz ! Ar bleiz, e gwirionez,
A zivarhas an nor distres.

Edo en ti, o ! pebez loen !
Evel pa vije ar perhenn !
Goue lakaad e fri dre-oll
E welas edo en e roll.

Kement tra dispak war an daol
Gantañ 'oe lonket en eun taol :
Kig sall, bara hag amann fresk,
Oll e tremenent mesk-ha-mesk.

P'en-devoe greet eun dommadenn

E klevas eun huanadenn ;
Ar bugel en e gavellig,
Dihun, a halve e vammig.

Korv al loen gouez n'oa ket leun,
Hag ez ee d'ar havell war-eeun,
Pa deuas en ti, gand eur goabrenn,
An dudiusa sklêrijenn.

Eur paotrig koant leun a zousder,
Bugel Bethléem, Or Zalver,
Aezet war ar goabrenn-ze,
D'an êlig bihan a vousec'hoarze.

Oh astenn e zorn benniget
A-uz d'al loen fall saouzanet,
Hemañ, goustadig d'ar havell,
A deu tre da gaoud ar bugel.

Neuze, o ! bruzud ! dorn Jopig
D'ar bleiz reizet 'ra allazig,
Beteg ma teu ar Mab Jezuz
Da rei frankiz d'al loen kablu.

Hag eñ ahano mar gouie,
D'an daoulamm endra ma'h helle ;
Edo e paouez mond er-mêz
Pa zegouezas ar gerent kêz.

P'o-deeus gwelet al loen gouez
O tehed gand kement a bres
E lavaront : « Heb mar ebed
Jopig a zo gantañ debret !... »

O halonou leun a hlahar,
Ha prest da goueza d'an douar,
Ez eont da ouela d'ar havell,
Da ouela maro ar bugel.

O vond en ti ez int dallet,
Ha gand ar sklêrder sebezet ;
Koulskoude tamm goulou ebed,
Nebeud a dan war an oaled.

Gweled a reont bremañ Jopig,
Laouen, dihun, er gavellig,
O vousec'hoarzin d'e dud karet
Pa wel anezo degouezet.

Dirag eun heveleb burzud,

Semplet, e kouezont o-daou mud...
Goude ar pennad troublienn
Ne welont mui tamm sklêrijenn.

Setu ar pezh am-beus klevet
Gand an dud o-deus va skoliet.
Lakom or fiziañs e Doue,
Diwall a ra e vugale....

Mouez an anaon

(D'an Aotrou Henry, Rener skol gristen Landi.)

Pa deu ar pardaez, pa deu an noz teñval,
Pa glevan ar hloh braz truezuz o voudal,
Pa glevan an ave er gwez sabr o vervel
Me 'zoñj en Anaon kêz tost din oh va gervel.

Gand o mouez klemmuz e laront en o yez :
« O ! c'hwi, or mignon deom, gwechall p'oam e buhez,
O ! c'hwi, hag on dilez bremañ pe n'ho kwelom,
Bezet truez ouzom, rag en anken emao ! »

E nozveziou ar goañv, p'eo an amzer skornet,
Pa yud an avel viz dre wask an nor zerret,
Me a gav din kleved moueziou an Anaon
O houlenn pedennou evid terri o naon.

Evid terri o naon da weled o Doue,
E lavaront deom-ni : « O ! c'hwi a zo aze,
« Azezet, en hoh êz en-dro d'eun tantad tan,
Pa houzañvan amañ, er Purkator, kalz poan ! »

Eun tad a lavar frêz : « O ! va bugaligou,
« Pa edon en ho touez, 'vid gounid deoh madou,
'M-eus espernet netra nag en deiz nag en noz,
Dre aked evidoh n'em-beus bet tamm repoz.

« E-pad ma'z on bet beo, c'hwi hoh-eus va haret,
Hirio, maro, ez on gand an oll dilezet !
Ho-pet truez ouzin, o ! c'hwi va bugale,
Rag kouezet eo warnon dorn pounner va Doue !... »

Re all a lavaro : » Deoh ez on bet mignon,
Keit ha m'am-boe madou, n'ahvezeh nemedon ;
Oll int chomet ganeoh p'eo deuet din ar maro,
Hag am lezit bremañ gand va foaniou garo... »

O ! na dleer 'vid den beza tud digalon,
Hogen nebeudtoh c'hoaz e-keñver an Anaon.
Pa glevit o mouez, e peb leh, e peb giz,
Lavarit kaloneg 'vito *Dre profundis*.

Ar paotr bihan kamm

(*Da Jeanne Kervern, Kerzadiou*)

Va mamm-goz, en deiz all ; ha me war he barlenn,
He-deus din displeget eur gaer a gontadenn ;
Ken don e va spered ema-hi c'hoaz hirio,
Ma han d'he disklêria deoh-hu ivez d'am zro.

Gwachall ez oa e Rozegad
Eur bugel fur hag euz va oad,
Hogen ker mahagnet, ker kamm,
Ma n'helle he branell flah tamm.
Bale, redeg, c'hoari, lammed,
Siwaz biskoaz n'en-doa gallet.
Eun devez e selle gand c'hoant
Re all o c'hoari gand arhant,
Pa dremenas en o hichenn
Eur paour o klask an aluzenn.
Skuiz-marô 'oa diôh an doare,
Ha naon en-doa 'dra zur ive' ;
War an hent braz, euz e zaou droad,
E tivere funnuz ar gwad.
Doaniuz meurbed 'oa da weled ;
C'hwi ho-pije e zikouret,
Hogen, ar yaouankiz 'zo skañv,
Hinin n'en-doa truez outañ...
Oll o-devoa eur galon fall,
Hag e reent goap en eur farsal.
Ar paotrig seizet, eñ hepken,
A ro d'ar paour e dammig krenn.
Neuze, o ! burzud ! 'oe gwelet
An truillou d'an douar kouezet,
Hag ar hlasker, sonn en e zav,
Sklêrijenn skeduz 'n-dro deza'.
D'ar bugel mad e lavaras :
éN'az-pezo mui ezomm a vaz ! »
Ha kerkent 'n em gavas pare
Dre zorn an Hini e douche.
D'an ampoent ez eas diwar wel,
Jezuz-Krist 'oa, 'me ar bugel !
Ar hêz en-doa greet aluzenn
Da Jezuz, mignon ar beorien !...

An tad-koz

(Da L. Thomas, amezeg gwechall)

Marteze n'anavezit euz Adam nag Eva
A tad-koz a anvom Per-an-ti-all ama' ?
Pevar-ugent vloaz 'zo ema dre Gerzadiou
O labourd bemdez parkeier e dadou.

N'eo ket red din lared ez eo gwenn-erh e vleo,
Ar re da vihanna 'zo war e benn hirio ;
Krommet dindan an oad, eur penn-baz en e zorn,
Per-an-ti-all 'zo c'hoaz ennañ yah an askorn.

An tad-koz a zo bet a-zoug ar wech eur skwer ;
Er gêr hag en arme, aketuz d'e zever,
Kaloneg gand an oll, gand e Zoue feal,
Eur gwir benn-tiegez, setu Per-an-ti-all !

Doue en-deus skuillet bennoz gand largentez
War e vugaligou, war e oll diegez ;
Diou verh leanezed, hag eur mab beleget !
A ! evid an tad-koz pegement zo pedet !

Tri all 'zo dimezet hag o-deus kemeret
En o harg an douar gand an tad-koz lezet.
Pebez urz vad amañ ! Nag a unvaniez !
Setu penaoz 'tlefe beza pep tiegez !

Er goañv, 'kichenn an tan, da hortoz ar housked,
E-pad ar veilladeg, en eur hounn azezet,
Ez eo plijaduruz e gleved o konta
Forz marvaillou giz koz, diwar-benn ar vro-ma'.

Me 'gred stard e chomfet, hep tamm keuz d'ar gweleou,
Beteg an hanternoz, bamet oll d'e zelaou.
A-drugarez Doue, ne vank ket a furnez,
Ha d'an taol a nav eur e ro sin an diwez.

Pa ya bep sul d'ar vourh, an tad-koz a gemer
Pevar gwenneg loued e goueled e yalh ler ;
Muioh na nebeutoh, defot n'en-deveus ket :
Setu e pe zoare 'vezont gantañ teuzet.

Ar gwennegig kenta 'vo roet d'ar paour-kêz dall,
A zo war an hent braz du-ze ouz e hedall ;
Per hen anavez mad, tost d'ugent vloaz a zo
Eun tenn-min hen lezas dall-pud evid atao !

Per-an-ti-all en-deus eur garantez wirion

Evid ar re varo, evid an oll Anaon ;
An eil gwenneg dezo a roy en aluzenn
Pa gesto ar fablig e-pad an overenn.

Martez c'hwi 'gred deoh ez a gand an daou all
Da eva gwinn-ardant d'eun ostaleri fall ?...
A-barz distrei d'ar gêr, bremaig war an dachenn,
E preno madigou d'eun toullad mibien.

Gwechall n'anvezet ket e-touez ar yaouankiz
An dispignou diboell, didalvoud e peb giz...
It d'al leh ma karfot, d'ar fest, d'ar pardonious,
Nag a arhant o ruill war ar hontouerou !

Gwechall, on tadou-koz a esperne o zra,
Ne deuzent o madou nemed evid netra.
Ha n'eo ket eun netra ar gwinn-ardant anvet,
A ra kement a zroug deom-ni oll, Bretoned ?...

An deliou en diskar-amzer

(Da Fañch Guivarc'h).

Deliou ar gwez melenet oll
A nij pa hwez an avel foll ;
Lavaret e vefe eneou
Deuet da houlenñ or pedesnnou.

Nag hi 'oa koant n'eus ket pell c'hoaz
Oh ar skourrou gand he liou glaz !
Hirio, siwaz ! int dislivet,
Ha dindan treid an oll breset.

Tud yaouank, kemerit kentel
Gand an deliou seh o vervel :
« Yehed,kened, a dremeno,
A-barz nemeur c'hwi a varvo !... »

Er bloaz a zeu deliou nevez
A zavo adarre er gwez ;
Goude breinadurez ar bez
Ni 'zavo ivez d'ar vuhez.

Chomet en ho klud !

(Da Louis Ar Gall, Kervern).

Bretoned, chomit en ho klud !
Labourit parkeier ho tud ;
Er mêziou euz pinvidigez
Hag er hêriou kalz dienez.

Paotrezed, chomit en ho klud !
Chomit e-kichennig ho tud ;
An dañvad dous pell diou e vamm
Na zaleo ket da gaoud lamm.

Bugale, chomit en ho klud !
Er hêriou ez eus avel yud,
Ar c'hwz kaled e peb amzer
War gorr hag ene ar skuber.

Kenvroiz, chomit en ho klud,
Chomit e karteriou ho tud ;
Er mêziou e kaver yhed,
Peoh gwirion, frankiz, eürusted.

Gallaoued, chomit en ho klud !
Lezit didrouz eur boblad tud ;
Ar Vretoned na hedont ken,
Lezit e dra digand peb den !

Meuleudi bro-Leon

D'ar Breur Constantius.

Pa oa c'hoaz paganed on tadou-koz e Leon
Doue 'n-deus war or bro greet eur zell a galon ;
E zaoulagad kel lemm a zibab ebestel
A gaso war-zu Breiz da brezeg an Aviel.

Abredig, Leoniz a welas
Sklêrijenn vurzuduz ar groaz
Da Leon Doue en-deus kaset
Eun niver braz a Zent vrudet.

E Breiz-Tramor, du-ze, Pol 'oa en e bedenn,
Pa wel tostig dezañ eun êl gwisket e gwenn ;
Euz an neñv e tered, degaset gand Jezuz,
Gantañ ar helou-mañ, a dra zur souezuz :

« Beleg santel, sav alese,
Gourhemennet eo gand Doue ;
Trezuz prim ar mor, kerz da brezeg
Da Vreiz-Izel ken ezommeg. »

Rakal Pol a zentas, gand eun nebeud meneh,
Mond a reas war vor, 'trezeg Arvor, dineh ;
Diêz e ve lared ar vad a reas dre-oll
D'on tud-koz paganed a veve en o roll.

Ar Vretoned, stard en o feiz
Na vez morse med eur gredenn ;
Da'r wir feiz kristen gounezet,
Arvorig a gredo bepred.

Ar pez en-deus greet Pol tro-war-dro da Gastell,
Pegement a re all o-deus e Breiz-Izel
Diskaret gizioù kriz, ha plantet en o leh
Kroaz santel Or Zalver, ha kustumou dibeh.

Heñvel a ray Mikael Noletz,
Bet eo dre Leon e pep parrez ;
Rag e zeskiñ an tad Maner,
Manah santel ; gwir brezegeger.

E Leon e talh an dud bepred d'o Brezoneg,
'Vel ma chom ar brennig en aod ouz ar herreg ;
Karoud a reont ivez o bro, o farkeier,
Evel goeñvi a reont pell diou o lanneier.

Ar baotred yaouank a vro Leon

A zo enkreiz en o halon,
Pa rankont, siwaz ! dilezel,
O farrez, o bro Breiz-Izel.

Leoniz a ya beb bloaz gand feiz d'ar pardonioù,
Evel ma'z ee gwechall araozo o zadou ;
Ar hustumou santel euz eur rumm d'egile
Koulz hag eun degouez sakr a dremen e leve.

E Leon ar merhed, ar gwazed,
Dirag o skeud na grenont ket ;
Hen diskouezet o-deus ervad,
N'eus ket pell c'hoaz, m'hoh-eus soñj vad.

Eur fleurdelizenn goant e Leon a zo savet,
Eun iliz kaer meurbed, da Vamm Jezuz gouestlet ;
Piou n'eo bet er Folgoad e harz skeudenn Mari,
O skuilla daelou puill, o kana, o pedi ?....

Eun dudi 'vez gweled Leoniz
Da zeiz ar pardon, deuet gand feiz,
Da zaludi en iliz koz
Rouanez vad ar baradoz.

Evel kador sant Per, bro Leon 'zo war ar roh,
N'oufe beza harpet war diazez kreñvoh ;
Ar mor diroll a sko, a sko pell amzer 'zo ;
Heb he diskara tamm, biken n'he diskao !

Leoniz o-deus eur pennn kaled,
Evel ar vro 'leh int ganet ;
Ar vourrevien n'hellint biken
Ober dezo nah o hredenn.

Yez enoruz or Breiz, yez koz ar Vretoned,
Ar Brezoneg dinoaz a zo hirio barnet,
Barnet d'eur maro trumm gand prnou diaouleg,
O-deus c'hoant ober deom komz hepken ar galleg.

Dre beseurt gwir e teuont-i
Da wallgas kement or yez-ni ?
Leoniz a stourmo kaloneg,
Evidi mired o Breozneg.

Dismantrierien dizakr, mistri eur pennad 'zo,
O-deus laret : « Brezel da gement a gredo !
Mui na Breur, na Beleg, mui ken a Leoniz !...
Setu o mennoz fall, deuet da benn, pe war-nez...

Dizale, 'vel en dispah braz,

E Leon 'vo diskaret ar groaz,
Ha serret kloz an ilizou
E-pad marteze bloaveziou.

Er skoliou dibater ar vugaligou keiez
Ne glevint mui ano a Zoue, nag a feiz ;
Dizrei d'ar gouezeri a hoantaont, me 'gred,
Evid ober deom-ni beva 'giz ol loened.

An den ne hell ket beva reiz
Pell diou sklêrijenn hlan ar feiz ;
Er fank, en draill, er vuntrevez,
Heb doujañs eun Doue e kouez.

Leoniz a zo tud a skiant,
Heuill an hent mad oll o-deus c'hoant ;
Mar bez red rei zoken ar gwad,
Her graint kentoh eged fallaad.

Arvoriz ker a Vro-Leon,
Beizt bepred tud a galon ;
Mirit giziou ar Vretoned,
Ha lezit re ar Hallaoued.

Keit ha veoh feal d'ho Toue,
Ha d'ar Brezoneg koz ive',
C'hwi 'vo eüruz en ho puhez,
Ha muih en neñv, eun devez !

**Ar vezventi villiget
He frouez – Eun torfed nevez.**

(D'an Aotrou De Trézac.)

Tostait, Bretoned, me ho ped,
En em vodit oll da gleved
Eun darvoud c'hoarvezet a-nevez
Dre gounnar dall eur roulerez.

Pa deu ar gwaz d'en em vezvi
Pebez dizurz e-barz en ti ?
Mar deo ar wreg, siwaz gwasoh
Ez a pep tra, me 'lavar deoh.

Ar wreg evdi kaoud gwin-ardant
A werz pa n'he-deus mui arhant ;
He dilladn heh arrebeuri,
A gaso d'an ostaliri.

Gounid ar mezhvier a zo treud,
Ne labour nemeur kennebeud ;
Tost d'an hanter euz ar zizun
A dremen beb beza war hun !

Gwelit anezañ d'ar zadorn,
E hounidegez en e zorn ;
Ha kaset e vo d'ar vamm gêz
'Vid diarbenn an naonegez ?

N'eo ket aze c'hoant ar mezhvier,
En ostaliri 'ma e gêr...
E teir eur en-devo teuzet
An arhant kement gortozet.

E-keit-se ar vugaliou,
Du gand an naon, a laosk klemmou,
O houlenn bara gand o mamm,
Red dezi lavared n'eus tamm !

Red mad e ve d'ar gwin-ardant
Dodn euz kalon an êrouant,
Evd teuler der ar bed-oll
Dizurz, torfed ha buhez diroll.

* * * * *

E miz c'hwevrer diweza, 'n eur gêr ha n'anvin ket,
Eun den euz ar re 'welis, Fañch, a oa degouezet
Da houlenn gand Yann Varzin, merour ar gêriadenn,

Da houlenneur zom arhant an hini¹⁸ ‘oa perhenn.

Koulskoude Yann Varzin, klañvidig pell a oa,
Edo war vein an oaled, tost d’an tan o tomma,
Pa weljod p tegouezoud gwreg Fañch, ar roulerez,
Liou ar gwin-ardant warni, ha dremm eul loen gouez.

Anaoud a ra koulskoude Fañch, he gwaz reuzeudig,
Hag e houlen, dijipt, arhant eun nebeudig ;
Hogen, o houzoud re vad e vije prim lonket,
Ema o respont dicheg : « Arhant n’az-pezo ket ! »

Ha goude beza stlapet mil malloz war he gwaz,
Ar wreg divez en e choug gand daou zorn a grogas ;
En doare-ze, korv oh korv, e kouezjont en oaled,
War ar hêz bugel dinoaz, ganto en tan pilet !

O kleved youhadennou ar bugelig en tan,
An eil war-lerh egile ‘sajont kuit diwarbennañ ;
Pa oe savet e vamm – e pe stad truezuz ! –
Ar hêzig ‘oa peuz-devet hag a grie klemmou !

Ne gredan ket e chomfe pell beo ar paotr bihan
Goude an darvoud skrijuz, mez gwirion, a gontan ?
Setu eun torfed muioh da staga, m’on-deus c’hoant
Ouz lost hir an torfejou greet gand ar gwin-ardant.

Al loen a oar ehana p’en)desu bet e walah,
Ar mezhvier na baouezo ken a vo leun e zah,
Ahann ma vezo teuzet ar gwenneg diwezañ,
Ha ma vo eet e moged e dammig skiant gantañ.

Mar deo mezuz ‘vid eun den, krouet evel Doue,
Diskenn ‘n eur stad ken izel, petra lared neuze
Euz kristenien badezet a zo ker stank hirio
A en em ro d’a evaj o laz hag o daono !

¹⁸ an hini : a bini, er skrid orin.

Al luskellerez

(Da Vadalen Thomas)

(Ton : ar pillaouer)

Va bugelig koant, kousk aze,
Dindan askell êl Doue ; (*diou wech*)
Kloz da zaoulagad seder,
Kousk aze, va bugel ker.

Diskan

Va bugelig koant ; kousk aze,
Dindan askell êl Doue

Krouadurig, me 'm-beus avi
Ouz ene 'vel da hini,
Digaitter c'hoaz diou ar pehed,
Dienkrez war draou ar bed.

Va halonig, petra 'vezi
War an douar pa greski ?
Oetra 'vezo da zeveziou
O treuzi an amzeriou ?

Marteze 'vezi eun eskob,
Karet, meulet gand ar bobl ;
Ha me da vamm a vo eüruz
Oh da weled gallouduz.

Ha te 'vezo den a vrezel,
Soudard savet e renk uhel ?
Pe prezidant ar republik
En eur gaer pinvidig ?

Heb ma ve red mond ken uhel,
Zoken en or bro Breiz-Izel,
Marteze te 'vezo brudet,
Ha gand kalz a dud doujet.

Siwaz ! Petra 'lavarant ?
Huñvreal, tra zur, a ran.
Ma vefes, va mab, eul lampon,
Pebez enkrez evidon !

Pinvidig 'vi ket, a gredan,
N'em-beus netra er bed-mañ ;
Labourad a rin koulskoude
Evid mad va bugale.

Va halonig, pegeid amzer

'Chomi tost d'az flamm er gêr ?
Ha da be leh, mabig ez i
Pa droi kein d'on toullig ti ?

An oll draou-ze a zo pell braz,
Va mab, n'o hlevez ket c'hoaz ;
E-pad da gousk, gand an êlez,
Nij da vro gaer ar Werhez.

Unan da vouez gand o re
Evid meuli da Zoue ;
Distro goude da lavared
D'az flamm pez az-po gwelet.

Poan 'rafes d'ah êlig !

(D'an Aotrou A. Gouzien, kure e Landi).

Bugelig koant ha mibin,
A gavan o c'hoarzin,
Ma tegouez ganez gweled
Eur c'houilig alaouret
O hournijal er prajou,
O klask ar bokedou,
Na dorr ket da askellig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

War gerreg flour an aotchou,
O tiskuiz a-wechou,
Ma tegouez ganez gweled
Ar hlazard perlezet,
O tomma en heol skeduz
E gorvig lugernuz,
Na vruzun ket al loenig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

Pa deu an nevez-amzer
Gand e zeiziou seder,
Ma tegouez ganez gweled
Pe viou, pe laboused,
Kuzet en eur harz lanneg,
Pe en eur valaneg,
Na zistruj ket an nezig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

Er parkou, oh ar hleuziou,
El leh ma'z eus bleuniou,
Ma tegouez ganez gweled
Eur wenanenn bladet,
Eur wenanennig dihloar
O klask mel dous ha koar,
N'he laz ket, va mignonig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

E-pad tommder an hañvou,
O redeg er mêziou,
Ma tegouez ganez gweled
Eur hrill kaner heoliet,
O kana mil meuleudi
D'e Grouer gand dudi,
N'he spont ket, va bugelig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

Ma pefe c'hoant eun devez

Gand gwall gompagnunez,
Da ber eun dra hrevuz,
Traou fall, c'hoariou euzuz,
Teh prim, teh kuit hebdale,
Truez ouz da ene !
N'he laz ket, va bugelig,
Poan 'rafes d'ah êlig !

(Kurunet er bloaz 1904, gand an Association Liitéraire et Artistique de Bretagne).

Seiz Sant Breiz-Izel

A-raog.

(D'am mignon an Aotrou A. Vallée, barz "Abherve", Rener Kroaz ar Vretoned).

Ni, Bretoned, kanom enor ha meuleudi,
D'on Fatroned eüruz, kanom oll gand dudi ;
Kanom a vouez uhel labourou, vertuziou,
Oberourien or bro, sent koz or harteriou.

E Breiz-Izel gwechall ar zent-mañ 'oa pedet,
D'o beziou a bell braz gand feiz e teredet ;
Siwaz ! ar hantvejou, pelll zo o-deus ledet
Gwel du an ankounah war giziou koz brudet.

En amzer eüruz-se den na oa souezet
Ma'z ee a-vandennou klz a berhirined
Da veziou Kaorintin, Brieg ha Pol a Leon,
Patern ha Tugdual, ha Malo, ha Samson.

Sant Kaorintin
(*Kenta Eskob Kemper*)

Ganet e Breiz-Izel euz a gerent kristen,
Abred mad Kaourantin a garas ar bedenn ;
Evid gelloud gweloh beza oll da Zoue,
Youankig, en eur hoad, e-unan 'n em denno.

Gand peskig e feunteun, Kaorantin, eun devez
A vag ar roue Gradlon hag e gompagnune ;
A henou da henou goude ker braz burzud,
Euz ermit Ploudiern pell e skignas ar brud.

Gradlon da Gaourantin istim a ziskoueze,
Karantez ha doujañs, anaoudegez ive' ;
Dezañ gand plijadur kalz douar a roas,
War ar re¹⁹ ar manah eur gouent a zavas.

Gradlon a hoantae kaoud eskob e Kemper ;
Kaourantin a zibab evid ar garg pounner,
Diwar neuze da vad bepred e labouras
Da gelenn e zeñved en deñvalijenn c'hoaz.

Ar blijadur en-doe da weled maread
Eneou kristenet o tond da gaodu o zad.
En diwez 'oe galvet david an eürusted
Gand Doue ar Mestr mad, e palez an Dreinded.

Breh santel Kaourantin gand doujañs a virer
En e japelig koant e iliz-veur Kemper ;
Pa vez, d'ar goueliou braz, a-wel da'n oll laket,
Klaz tud eno 'weler, dirazañ daoulinet.

¹⁹ ar re : war bere, er skrid orin.

Sant Brieg

(Kenta Eskob ar gêr a zoug e ano)

Brieg a Breiz-Veur 'zo ganet
Euz a gerent dijentilet.

Euz a gerent dijentilet
Mez, siwaz ! ivez paganed.

Eur wech ma'z eo bet beleget
E Breiz-Veur en-deus prezeget.

Eur pennad mad e labouras,
O planta e peb leh ar groaz.

Setu eun êl a-berz Doue
O tond d'e gaoud eur beure 'oe.

« Sav alese, beleg santel,
Ha kez war-zu bro Breiz-Izel' »

Heb marhata ez a kerkent
Gand tri-ugent manah en hent.

El le m'ema kêr Sant-Brieg,
N'ez oa neuze 'med eul lanneg.

Eno 'savas eun abati
En hini²⁰ kare pedi.

An eskob mad a oa karet,
Ha gand ar bobl, meulet, doujet.

Kendalher a reas da deuler
Ar gwella had d'e zeñved ker.

Sevel 'rajar a-nebeudou
En-dro d'ar gouent tiegeziou.

Setu penaoz e oe savet
Ar gêr euz e ano anvet.

Erfin, karget a labourou
E varvas, war-dro pemp-kant daou.

Mired a reer e Sant-Brieg
Relegou 'n eskob kaloneg.

²⁰ En hini : e pehini, er skrid orin.

Sant-Pol a Leon

(Kenta Eskob Kastell)

Genidig euz a Vreiz-Tramor,
Abred e klaskas eur goudor
Eid mired e ene glan,
Ha bezañ gand Doue unan.

Goude goulen ouz e gerent
An aotre da vond d'ar gouent,
Da zant Ildud, manah brudet
D'an oad a bemp bloaz 'oe fiziet.

Eur wech ma'z eo bet beleget,
Ar feiz en-deveus prezeget
Da dud Breiz-Veur a zerede
D'e gleved euz a bep koste'

Gwelom amañ, ni, Bretoned,
Evez Doue en on andred,
gervel a ra da zond d'or bro
Ebestel dispar ar feiz, beo.

Da gaoud Pol, ar beleg santel,
Eun êl a deu a-denn-askell :
« Gwel du-ze, Pol, dreist ar mor braz,
Poblou en deñvalijenn c'hoaz !

Azezer e skeud ar maro
Eneou en em goll heb distro ;
A-berz Doue, kerz d'o zikour,
Treh e vezi d'an enebour !.. »

Pol, o sevel, a gerz raktal,
Ha gantañ daouzeg manah all ;
Diskenn a reont oll en Eusa,
Leun a baganed ar gwasa.

Kentre sant Pol hag e veneh
A ya da brezeg e peb leh ;
Hag a-bennn fin ar c'hwehved miz
An oll a oa ganet d'ar feiz.

Ha setu eun êl adarre
Da gaoud Pol, hag a lavae :
« Serijer feal, it larkoh,
E goueled Leon, it uhelloh... »

Ar hont Wizur a houarne

Douarou bro Leon d'ar mre,
Hag a roas dezañ e balez
'Vid loja e gompagnuez

Eun êrouant skrijuz meurbed
E Kastell 'zebre tud, loened ;
Sant Pol goue beza pedet
Her beuzas hep tamm droug ebed.

Gand pobl d noblañs dibabet,
Sant Pol a oe eskob sakret ;
Aliez 'wele e zeñved,
Siwaz ! oll neuze paganed !

Erfin dinerzet, ha koz braz,
Sant Pol e garg a zilezas,
Da hedal e peoh ar maro,
E goudor eur gouent distro.

Sant Patern

(Kenta Eskob Gwened)

Ar sant-mañ ‘hanas ivez en or bro Breiz-Izel,
A noblañsou pinvidig, euz a lignez uhel.
Abredig e tisprizas madou ha gloar ar bed,
Evid beza da Zoue korv, ene ha spered.

En eun ermitaj kuzet ‘tremene an amzer,
O pedi, o kastiz eur horv c’hoaz gwall dener,
E vertuziou dreist vuzul a zachas deskibien
A hoantae eveltañ beva er binijenn.

E-touez ar re-mañ ‘kavom an abostol Patris,
Abostol braz Iwerzon, den santel leun a feiz.
Patern ‘oe gand Meriadeg da eskob dibabet
Pa oe greet eun eskopti er gêr goz a Wened.

Goude ma oe greet eskob e labouras bepred
Da hounid oll da Zoue deñvedigou Gwened ;
Er gel a ze n’espernas netra na noz, na deiz,
Evid lakaad da bara sklêrijenn splann ar feiz.

Hini bremañ na houfe lared gand gwirionez
An oll vad greet er vro-mañ dre skweriou e vuhez,
Ar vuhez-se ken kaled, ken leun a vuzudou,
Euz e zauarn e koueze bep seurt madoberou.

En despet d’e zantelez, tud a gavas abeg,
A vroudas dre warizi an eskob kaloneg ;
Patern, ‘vel ar pastor mad, pell amzer a boanias
Da hounid o halonou, heb dond a-benn, siwaz !

Heulia ‘reas neuze ar c’hoant en-devoa bet atao
Da ren eur vuhez kuzet, en eur hornig distro.
Nebeud amzer da houde ‘vid ar sant e sonas
Eur eüruz ar wir frankiz en devez ma varvas.

Ar sant-mañ a oe beziet el leh ma’z oa marvet,
Leh nebeud anavezet, deut prim da veza brudet,
Doue dre-oll enkantas milid²¹ e zervijer
Dre vuzudou c’hoarvezet war ar bez, heb niver.

²¹ milid : delllid.

Sant Tugdual
Kenta Eskob Landreger.

Setu c'hoaz eur zant all ganet e Breiz-Tramor
Da hini²² gand bennoz or bro garet Arvor,
Dre m'en-deus prezeget ar wir feiz pell amzer
Kerkoulz e Leon hag e Treger.

E skol vrudet Ildud, kaset yaouankig c'hoaz,
Hebdale Tugdual a deuet desket braz ;
Hogen, e zantelez, par d'e zeskadurez
A oa ivez war gresk bmdez.

A-houdevez abad en eur gouent euz e vro
E labouras dalhmad da veza war eun dro
D'e oll veneh eun tad, hogen ivez eur skwer,
Gand e galon meurbed tener.

Souezuz eo ar vad greet gand ar zant e Breiz,
Oh hada dre vro Leon, hag e Treger, ar Feiz ;
Goulenn a reed dre-oll darn euz e zsikibien
Evid skign ar wir sklêrijenn.

Anvet 'oa bet eskob er gêr a Landreger
Gand ar bobl anaoudeg evel gand ar hlouer²³ ;
Hogen e nerz-kalon da hourdrouz an dizurz
A gounnaras an dud kabluz.

Evid peoh an Iliz, Tugdual a zilez
E garg pounner meurbed gand laouenidigez,
Evid mond er gouent eur pennad da veva
Gand e hoar abadez, Seva.

Hebdale, Tregeriz, kastizet gand Doue,
A halv da zond en-dro an eskob adarre,
An hini²⁴ a labour 'vid o zilvidigez
Keit ha m'en-deus eun tamm buhez.

Eu gurunenn skeduz en neñvou a hede
Eskob santel Treger d'he hemer dizale,
Dre eur maro eüruz, evel m'en-doa bevet ;
E vez goude 'zo bet brudet.

²² hini : bini, er skrid orin.

²³ hlouer : ? (houer ?)

²⁴ An hini : Pehini, er skrid orin.

Sant Samson

(Kenta Eskob Dol)

Abredig mad ar zant-mañ 'oe kaset
Da skol Ildud, an abad ken brudet ;
Medelezuz, devot, bugel sentuz,
Re a eure eru vuhez oll skweriuz.

E skol ker vad, Samson en-deus desket
Skaint ar zent gand skiantchou ar bed ;
Goude reseo ur ar velegiaj
En em dennas e-barz eun ermitaj.

Eno, noz-deiz, koulz lared, e pede
Hag e kane meuleudi da Zoue,
Beteg ma oe gand noblañs hag ar bobl
Greet e Breiz-Veur abad hag arheskob.

Nebeud goude eur zoñj 'zo 'n e spered
C'hoant en-deveus da Vreiz-Izel doned,
Devet gand youl da hounid da Jezuz
Eneou paour kalz a dud gwalleüruz.

Setu perag dizale 'oe savet
Abati Dol, e berr amzer brudet.
Prezeg a reas ar wir feiz tro-wa-dro,
Gand e veneh, a jeñchas tu d'or bro.

A-houdevez, Samson eet da Bariz,
A oe anvet war gador Dol, e Breiz,
Gand ar roue, d'an hini²⁵ e plije
Vertuziou kaer Samson, an den Doue.

Tri bloaz goude, uzet gand al labour,
samsaon a varv, koulz lared 'vel eur paour ;
Uhel en neñv ez a da ziskoueza
Ekreiz eur peoh peurbaduz evita'.

²⁵ d'an hini :da bini, er skid orin.

Sant Malo

(Kenta Eskob Aleth)

Brudet dre galz a vurzudou,
Malo, gand an oll noblañsou,
Da eskob a oe dibabet
Er gêr Aleth neuze anvet.

Na noz, na deiz, renoz ebed,
Kement e kare e zernved ;
Gourdrouz a ree paour, pinidig,
Gand eur garantez virvidig.

Evel hada war e hent,
Burzudou ar vrudeta sent ;
Ken niverennuz int, va zud ker,
N'hellan ane' lared eur ger.

Dre hardiegez da damall
An dizursiou d'ar pennou fall
War vêt an eskob a dennas
Eun arme spontuz a drahas.

Ma oe red dezañ en em denn,
Lezel omm e zernved a-grenn ;
Oh o fizioud e Doue an Tad,
Setu Malo pell o kuitaas.

E-pad m'oa bro Sautonj brudet
Dre vurzudou an harluet,
E kêr Aleth, ha tro-war-dro,
E falhe founnuz ar maro.

Neuze 'wel, an dud dallet !
Penazo ez int bet faziet ;
Hag e kasont d'ar pastor mad
Eun daouzeg pe drizeg kannad.

Eun daouzeg pe drizeg kannad
D'e bedi da zsitrei timad,
Hag ar henta gwella d'Aleth,
War-zu e bobl oll glaharet.

An eskob 'oe degouezet
Gand eul levenez vraz meurbed ;
Hogen, eno ne jomas pell,
Hervez eun urz deuet gand eun êl.

Erfin, karget a labourou,

Koz braz, ha leun a vertuziou,
Malo a ya d'an eürusted
En-doa pell a oa gounezet.

Danevell
Santez Gwennig

Santez Gwennig a vevas en naved kantved, war bord mor Breiz-Izel, e-kichennig bourh Beuzeg, war horre tevenn Porspiron. He dremm leun a zouder a zo c'hoaz galvet gand labourerien an douar, ha dreist-oll gand martoloded ar vro. Bez' ez eo patronez ar re hoarvez gwall zarvoudou ganto war an dour, hag, en eun doare ledannoh, skoazell an oll dud poaniet, eun dra bennag evel Intron Varia-Wir-Zikour, hogen chomet muioh e kuz.

He buhez penn-da-benn a zo eur burzud, adaleg ar mare ma oe gwelet evid ar wech kenta war douar Breiz, d'he 16 vloaz, beteg an deiz ma'z eas diwar-wel, eun eun taol kont, daou zevet goude, o tremen, eno eun nebeudig euriou hepken, euriou ken buhezeg, ken leun, ma'z int a-walh da rei da anaoud ar pezh a oa teñzoriou heh ene hag ar zoursenn²⁶ euz he vertuziou.

Gwennig ! Heh ano, ha na lavar ket deom a-hend-all, dre ar pezh en-deus a guzet evid kalz a dud

eru weledigez hlan e-bar en neñvou digohenn, pe gwagennou skeduz en eur mor a beoh ? Gwennig !; Klevañ a reer eru zon hwec en ano-ze, ha na weler ket ar pezh a ra dezañ beza ker mad. Ema c'hoaz ar spered, ha kerkent e teuer da zoñjal el laboused klevet o kana en eur hoad, el leh ma'z een da glask êr fresk an nevez-amzer.

Felloud a ar din rei deoh da houzaod penaoz ema 'r vro en hini e termenno ruriou souezuz-se.

Bourh Beuzeg, gand e dour koz, kelhet gand eur guchennig tiez toet gand plouz, a zo bepred en e zav. Beza ema war-dr eun hanter leot dioh tevenn Porspiron, el leh ma kreder e vevas ar werhez yaouank.

N'eus ket kalz a dra da weled e bourh Beuzeg. Hogen, pa ziskenner ahano evid mond etrezeg ar mor e treuzer eur hoad gwez pin, dilerh koajou braz a en em lede, bremañ ez eus meur a gant vloaz, war an aochou-ze leun a gerreg. Eno koueriaded an amzer-ze a yee war-lerh ar moh gouez beteg en o zoullou kuzeta.

Ar hoajou-ze a oa a-zioh riboullou leun a drêz, ar re,²⁷ da zeiziu skeduz an hañv, a lugerne evel eun dousier²⁸ alaouret war an hini²⁹ tarziou glaz ar mor a deue da vervel en eur stoufaad eonenn ; Hirio ez eus nebeud a wez eno ; en o leh e kaver parkadou lann, dezo bleun melen evel an aour, balan ha brug ; hag e heller, d'ar pardaez, kredi eo Gwennig a douch outo gand he zreidigou noaz, pa weler anezo o krena dindan an êzenn fresk. Ma ne gaver ket ar gwez sabr, heñvel ouz pilierou iliz-veur eun eskopti eo marteze abalamour Gwennig ne fell ket mui dezi kaoud nemed an neñv evid toenn.

Ne weler mui kennebeud ar moh gouez ; ar zaout du bremañ, saout Breiz-Izel, ker mad da lesa³⁰, eo a bigne ar gwenojennou riskluz, o peuri brug ruz an devenn ; degaset 'vezont d'ar verouri gand ar mesaer, a ra d'e skourjez strakal e korniou distro an hentchou leun a hekleo.

E keñver, setu pleg-mor Douarnenez, azaleg Beg-ar-Raz, beteg Beg-ar-Havr, digor frank d'al laonennou mor, a freuz en eun doare ken plijaduruz en hañv ma kredfed a-boan int an heveleb re a groz ken spontuz e nozveziou teñval ar miz Du, ar miz dreist-oll euz ar spont, miz ar peñseou, ha miz Gwennig ivez.

E gwirinonez, er miz-se teuas da Vreiz-Izel ; ha Doue a falvezas dezañ e tiskennje e zervijerez yaouank el leh-mañ dre ar burzud a dle beza ar mên-diazez euz he zantelez.

²⁶ ar zoursenn : galleg brezonekaet.

²⁷ ar re : pere er skrid orin.

²⁸ dousier : ?

²⁹ an hini : behini, er skrid orin.

³⁰ lesa : lêsa.

Ar Saxonzs krbanuz a yee atao war-a-raog, ha tud Breiz Veur a zerede a-vandanennou war-zu Arvor, an hini³¹ a deue da veza o mamm-vro nevez. Evel-se e pignas Gwennig hag he herent war al lestrig a dlee o degas en or bro. Kement-mañ a zegoueze e miz Du, hervez testeni paperou koz. Surprenet gand ar vougidell ha gand ar gwall-amzer, e kolljont o hent, ha n'o-doa mui evid gouzoud dre pe du mond nemed an tan euz al listri a welent dirazo.

Hogen, an oll a oar pegen kriz 'oa Bretoned an amzer-ze.

Beza ez oant eonnennerien mor, o veva gand al laeroñsiou greet ganto war al listri. Kustum 'oant da staga goulaouennou rousin oh kerneil ejenned d'ar re o-doa hualet an treid, ar pez a ree d'ar goulou beza heñvel eun tamm bennag oh sklêrijenn al listri war ar mor. Evel-se ivez 'oe faziet ar vag war an hini edo Gwennig hag he herent. O kredi tehed ar herreg evid mond pell dioh an aochou e teujont da steki outo, ha d'en em goll. Gwennig hepken a hellas en em zavetei. Perag hi ? abalamour Doue en-doa a-benn neuze skoet he halon gand e hras nerzuz ; hag epad ma c'hweze an avel foll, Gwennig , en eur horn euz al lestr, a bede euz a oll nerz he halon c'hoaz glan. Kredi a reas bale war ar mor kounnaret, o rei an dorn da Jezuz, ar Pastor mad, euz an hini 'oa an aon dousa ha gwenna ; Ar gwall amzer a goueze dre oll ma tremene gant-Hañ. Dizale kement-mañ 'oe eun dra wir eviti. D'ar mare ma stoke al lestr oh ar roh, Gwennig na welas netra en-dro dezi ; hogen, eun dorn a groagas en he hini, hag a zachas anezi goustadig. Mond a reas da heul ha ne welas he-devoa baleet war mor nemed pa lakaas he zreid war an aod. Neuze an dorn en-doa he bleinet a ziskrogas, hag en em gavas he-unan.

N'oa den d'ar mare war an aod. Hogen, pellohig, a-dreñv eur grehenn, el leh m'ema penn ar wenojenn a gas war greh an devenn, e welas tammou mad a houlou rousin, sanket en douar, ag 'teue kalz a voged, hag eur sklêrder a zeblante dond euz an ivern.

Heb aon ebed ar bugel a dostaas outo. Ha perag he-divije hi aon ? E gwirionez dorn Doue en-doa he lezet ; hogen, daoust ha ne ouie ket edo atao en-kichenn ? Daoust ha ne gleve ket anezañ en he halon ?

Dond a reas eta goustadig beteg ar goulou, a zeve oh ober eun tammig trouz, ha pa oa tostig e welas – tra spontuz ! - eur goan direol hag iverniuz chomet a-zav en eun taol kont.

Kerniou boud leun a win c'hoaz a oa eno sanket en trez dre o fenn-moan ; tammou braz a fig-moh-gouez a gaved amañ hag a-hont, stlejet war an douar, hag a daole eur flêr spontuz a lard rostet. Du-ze, podou alaouret, braoigou a bep seurt, traou deuet euz ar peñseou, e berniou ken braz an eil hag egile lakaet el leh m'edo an dud gouez o koania eun nebeud amzer a-raog.

Pleñch ar barrikennou distoufilet³², leiz c'hoaz, al ugerm dindan bannou an tan o lrena, agostez, e-kichennig ludu ruz eun tantad maro, tud-koz ha gwragez hanter-noaz, mesk ha mesk, astennet war an drez hag an askol, a oa o hoi o horvajou gwin-ardant. Ar re-mañ 'oa ar re 'oa ar re n'o-doa oll gallet tehed da heul ar re all po-doa gwelet Gwennig o vale war ar mor, eur sklêrijenn skeduz en-dro dezi. Edont e-touez an drez hag ar spern ; n'o-doa ket gallet mond pelloh. O weled kement-se, Gwennig a zantas he halon osevel gand heug, hag he-doe krenienn er wech-mañ, rag m'oa gwenn evel kerniou ar menezioù goloet a erh ; abalamour ivez n'he-doa morse gwelet teñvalijenn an dud fall, na zoken klevet ano anezo ; abalamour c'hoaz m'edo o paouez gweled Doue, ha ma edo bremañ dirag eur skeudenn euz an ivern ; abalamour, en diwez, mousc'hoarz ar gwragez divezet ha mezo 'oa heñvel ouz c'hoarz fall an diaoul, Gwennig a zaolinas hag a bedas.

Edo ken don en he fedenn, ma ne welas ket ar furmou tuð o tond war-lerh egile euz toullou ar reier a oa en-rdo d'an devenn hag o riskenn euz ar hoad war an aod, hogen goustadig, evel aon dezo.

A-nebeudou e tostajont, oh ober signalou an eil d'egile. Pa 'z oant degoeuzet en-dro dezi, he gweljont kelhet gand eur sklêrijenn par d'an hini a deu euz an heol dreist an tarziou mor pa

³¹ an hini : pehini, er skrid-orin.

³² distoufilet : ? didouillet

sko so warni e vannou da vare kreisteiz. Hogen gweled a rejont ivez n'oa nemed eur bugel, hag e rojont dezi anano a "*Gwennig ar mor*."

Pa oant degouezet oll eno, gwazed, merhed, tud-koz ha bugale, giwked gand truilhou a bep seurt liou, lod laouennou alaouret warnezo, lod all fichet gand braoigou arhantet, deuet oll diwar-goust ar paour-kêz tud sachet ganto eno da veuzi, neuze Gwennig, kreñvee gand he feden a zavas, c'hoanteg evel eur bugel, ha dispont evel eur zantez, evid teuler he sellou war ar vodennou tud-se spontuz ha mez o gweled, hag a jome eno bremañ heb flach, dalhet gand eun dra zouezuz ha na entent ket.

Gwennig a gomzas :

-« Ho-pet truez ouzin, na rit ket a zroug din. Edon war al lestr hoh-eus degaset war ar reier. N'eus nemedon a gement a ve salvet ; na rit ket a zroug din ; n'eus nemedon e buhez ; n'am lakit ket d'ar maro. »

O seled neuze war-zu ar penn pella euz an devenn, e welas eno eun tiig koz, greet gand mien, hanter-ziskaret hag e lavaras ouz hen diskouez d'an oll :

« Lezit ahanon da veva aze ! »

E-kreiz teñvalijenn an noz, an ti koz a oe, en eun taol sklêrijennet, 'vel pa vije bet an heol o para.

Oll e kouezjont d'an douar, spontet.

« N'ho-pezet aon ebed, a lavaras-hi, me zo o vond da gousked. »

Gwennig a bignas heh-unan war an devenn, dre douez ar raden hag ar brug. He gweled a reyor, gwenn, lugernuz, o vond dre ar wenojenn ; he zreid na stokent tamm ebed oh an douar. Nebeud edo e toullig ti. Al laeron-vor a oa chomet bamet war an aod, o selled gand enkreuz ouz eur burzud ken souezuz ; ha pa ehanjont da weled furm hlan ar bugel, e kouezjont, o fenn harp en trêz evid tremen an noz. Antronoz vintin pa zivunjont pep tra a oa evel kustum en-dro dezo. An ti dirapar n'oa ket mui skeduz evel en derhent. Dilerh ar vag vruzunet, hag ar horvou maro a oa bremañ war an aod, degaset di gand tarziou ar goueled.

Gwennig a zeuas dizale er-mêz euz he zi o teuler eur zell hir war linenn an dremmwel ; liou briz-wenn an neñv ne ree nemed unan gand hini ar mor. Hag e troas da zelled war-zu an devenn ; souezet maro e oe o weled eno c'hoaz an dud kriz e-touez ar re³³ he-doa tremenet e penn a-raog an noz a-raog ; eur guchenn vugale hepken 'oa eet da gichenn ar mor evid dastum restachou ar vag ha diwiska ar horvou maro.

Gwennig a gredas, heb mar ebed, beza o paouez ober eun huñvre spontuz. Frota 'reas he daoulagad, hag e sellas adarre en-dro dezi ; neuze e tiskennas diwar an devenn, o chom a-zav gwechig an amzer evid selled adarre. A-veh war ar plên, e haloupas da vond beteg ar mor ; eno eh anavezaz korv he mamm, goullet oll.

Ar baotred vihan a zache war he bleo evid he zenna war ar seh. Gwennig a oa merh en deiz-se, hag an adelou a zeredas euz he daoulagad/ D'en ampoent wennig n'oa mui heñvel ouz eur spered euz ar bed all, rag gwela a ree ar bed-mañ ; an dud gouez dispontet a dostaas outi, mez ganto, lod diskrouniet o dent ha kounnar en o halon, lod all o c'hoarzin, droug enno oll outo o-unan, abalamour, emezo, 'oant bet trehet en derhent gand eur baotrezig c'hwezeg vloaz, mezo ma'z oant kemend a win o-doa evet. Kredi a reent n'oa tremenet netra direiz nemed en o spered trevaliet. Tevel a rejont koulskoude dirag glahar ar bugel, ha sklêrijenn an deiz-se a welas ; tra souezuz ! parezed ar gwazed-se en-dro da Wennig, oh he frealzi gand eun deneredigez a gaver aliez zoken e-touez an dud gouez. Ober a reent dezi pokad d'he mamm evid ar wech diweza war an douar-mañ, evid kas goude-ze a-zirag he daoulagad ar horv an hini³⁴ ar gwel a ree kemend a boan dezi.

³³ ar re : pere, er skrid orin.

³⁴ an hini : a behini, er skrid orin.

Eun den kreñv evel eur gouriner a zammas neuze ar horv war e skoaz hag a bignas war an devenn, an oll wazed ouz e heul. Gwennig a leze anezo da ober diogh o hoant, hag a zegemere zoken o homzou frealzuz. Eun hanter eru goude, ar wazed a reas eun hopadenn euz ar hoad-pin e leh m'oant en em dennet, ha kerkent ar grwagez, ha Gwennig ganto, a yeas d'o haoud. Edont en-dro d'eun tachad douar nevez distroet. Eno edont o paouez douara mamm gêz Gwennig. Houmañ a gouezas d'an daoulin en eur ouela. Goulenn a reas goude-ze daou skourr gwez, gand ar re³⁵ e reas eur groaz hag a zankas war ar bez. Ha Gwennig en em roas da bedi.

Al laeron ne ententent netra e kement-se. A-nebeduou ez ejont kuit, evid peurzastum ar pez a zsitaole koummou ar mor d'o avaristed, ha presig goude edont war an aod. O huñvelez a oa chomet er hoad gand ar bugel ; 'oant adarre eonnenrien-vor kriz ha digalon evel diaraog ; dizale n'oa mui nemed eur vozadig merhed e-kichenn ar bez.

Gwennig a bede atao.

War-dro mare kreisteiz e klevas, o tond euz an aod, eun huanadenn hag a reas dezi sevel en he sav. An nebeudig merhed chomet ganti a redas en eul lamm war horre ar grehenn, a beleh e weled mad kement a dremene war an aod.

Gwennig, souezet, a yeas d'o heul.

Edohoh enkanti kreiz an deiz, o lavared ar bedenn d'an Doue Heol. Eun den koz, en e zav war ar roh, e ziouvreh astennet etrezeg steredenn an deiz, a lavare e rouantelez ; e-harz e dreid, ar re all, o diouvreh astennet eveltañ, a gane gand eur vouez nerzuz :

Eienenn vraz a sklêrijenn,
A zioulder hag a gorventenn,
Puñs ar vuhez, on doue, Heol,
Salud dit, a lavaront oll !

Neuze Gwennig a welas perag en-doa Jezuz he bleinet war an aod. Pa oa echu ar pedennou d'an heol a kendalhjont da ziwiska ar re veuzet. Euz an uhelder el leh ma edo, Gwennig a gredas anaoud anezo.

Goulenn a eure digand ar merhed petra 'vije greet ezu ar horvou maro ; war o respont e vijent stlapet en eun aod tostig ahano, euz a beleh ar mor o zachje d'ar pellder. Gwennig a houlennas ma vijent douaret ; ar pez a oa aotreet dezi adarre dre druez. Tost d'an toull greet a-ziaraog evid mamm Wennig e wejer sevel eun toull all ledannoh ha donnoh. Eno e oe diskennet korvou an dud veuzet, hag ar plah santel a lakaas ivez eur groaz war an bez nevez ; An dra-mañ a houlenne eur ger sklêridigez evid an dud dizesk-se. Eur vaouez her goulennas :

« Evel-se 'vez greet en or bro-ni, a lavaras Gwennig, abalamour Jezuz a zo maro war ar groaz. »

C'hoant o-doa da houzoud petra 'oa ar Jezuz-se.

« Mab Doue eo, emezi, a deuas war an douar evid savetei an dud ; hogen her staget o-deus ouz ar graoz. »

A ! laeron-vor a zellas an eil ouz egile ; eur mennoz a dreuzas spered unan anezo, hag a lavaras :

« Penaoz eh-eus-te gallet en em vired diogh ar maro, pa'z eo beuzet ar re all a oa ganez ? »

« Abalamour, emezi, ma karan anezañ ; ne zoñjen nemed ennañ ; setu perag pa'z eo eet ar vag da strad ar mor, eñ e-unan eo en-deus kroget em dorn evid va degas beteg amañ ; galloud en-deus da ober kement a blij dezañ, peogwir eo Mab Doue. »

An hini en-deus greet ar goulenn, hag a oa e renk kenta azezet war ar brug a zavas goustadig e-pad ma komze Gwennig., ha pa he-doa ehanet da gomz ez eas kuit d'ar haloup, o teuler youhadennou spontuz e-giz pa vije bet e dreid en tan. An oll, sebezet, a zelle outañ. Her

³⁵ ar re : pere, er skrid orin.

gweled a rejont oh ober ardou evel eun den diskiant, o lammad war ribl an devenn beteg ma'z eas diwar wel er pellder.

An heol en dremmwel a veuze er mor. Den ne grede komz ; oll ez oant strafuillet, aon a grogas enno.

Gwennig a bede dirag ar beziou.

Seblantoud a ree gwennaad dre ma teue ar pardaez hag an noz d'en em astenn war ar mor hag ar reier ; ha pa zavas evid mond d'he lochenn, sked he sae a zeuas da veza sklêrijenn. Ruzder diweza an heol a varve. D'an ampoent Gwennig a daolas he zreid en he zi, an hini³⁶ a oa slêrijennet evel pa vije bet ennañ. Pa oa goloet an douar gand teñvalijenn an noz, ar sklêder-ze a zeuas en eun taol da veza evel tan an heol. An eil goude egile, ar wazed chomet e-kichenn ar beziou a guitae sioulig evid mond da guzad e donder ar hoad. En deiz-se n'o-doa ket evet, ha dre-ze 'oant sur e welent mad ar pezh a dremene dirazo. Ouspenn-ze, ar bugel he-devoa lavaret dezo traou souezuz braz ; unan anezo en-doa kollet e skiant vad oh e zelaou ? An amzer a oa pounner, hag evid c'hwez doareou fall gantañ. Eur pennadig goude ne jome mui den na war-dro ar beziou, na war an aod.

En deiz war-lerh, Gwennig a oe Santez.

Dond a reas abredig er-mêz ; hag e ve na wele den na war an devenn na war an aod, e teuas da zaulina e-kichenn he zud ker. Chom a eras pell da bedi. Abalafin³⁷ e klevas trouz a-dreg he hein.

Kardeg 'oa, hennez hag a oa tehet en derhent eid mond n'ouie 'dare da beleh goude beza klevet ar bugel o komz. Bremañ 'oa dizroet, ha degouezet en he hichenn e stouas d'an daoulin hag e stardas e vuzellou war dreid gwenn ar werhez ? Goude beza he halvet dre heh ano n'he-doa koulskoude klevet biskoaz, Gwennig a lavare kement a dremene en he sepred. Aliz, e-pad ma komze, an eonnenner-mor a skrije. Gwennig a lavare c'hoaz :

« Perag, Kardeg, eh esu gwelet e-pad an noz, ha perag e welez c'hoaz er mintin-mañ ? »

An den a zavas e benn hag a ziskouezas e zaoulagad leun a zaelou ; seblantoud a reas goulenn truez ha trugarez.

« Na ro respont ebed din ; entent a ran da zaelou ; gweled a ran e kredez kared ahanon ; hogen, n'eo ket me a garez, an Hini a garge ahanout euz e hrasou eo, Jezuz. Hennez hag a zo din evel eur breur d'e hoar. C'howant En-deus da gaoud ahanout evid e Vab ; Hennez eo an hini a hell pep tra, an hini a ra kement a hoarvez, hag en-deus da weled kerkoulz war an dud ha war an heol ; Hennez eo a garez. »

Hiniennou euz ar gwrazez a oa bet en-dro dezi en derhent a deue adarre en eur grenn, aon dezo. Gwennig o galvas. Komz a reas dezo euz eun Doue dispar, kalz galloudusoh eged an heol, ha kuñvelloh war eun dro, pa'z eo gwir sklêrijenn an deiz n'eo ken nemed ar skeud anezañ, ha mar deu dreist pep tra da sklêrijenna ar halonou gand eut sklêrder kalz c'hwekoh eged hini an deiz skedusa, gand eur freskadurez dudiusoh eged ar hristal o kana eienennou.

Kardeg, bepred harp oh an douar, a boke d'he zreid.

Plahed ha gwazed all a oa deuet ivez beteg enni ; oll eh azezent war-dro ar beziou, heb an disterra trouz na grozmoz. Oll e selaouent, o halon mantret ; Lod, spontuz da weled a zaille en o daouaran skanteg ; Lod-all a zalhe o daoulagad da bara war ar bugel, kazi kaouen, e-giz pa en-divije pep hini euz he homzou 'lakent e kalonou an dud gouez-se eur veradenn eur ar vammenn a eürusted a hini³⁸ e komze.

Bez' e tlee beza kreiz-teiz. Dizale e klevjod adarre an heveleb inkanterez, evel en derhent. Oll e rejont eul lamm evid sevel. Gwennig, ar bugel dister, he-devoe neuze eru jestl ken nerzuz, hag eun taol lagad da ziskara evel ar gurun. Den ne gredas flach.

³⁶ an hini : pehini, er skrid orin.

³⁷ Abalafin : galleg

³⁸ hini : a behini er skrid orin.

-« Petra, emezi, ha red eo eta e teufeh da azeuli ar voul dan-ze greet euz a netra gand an Aotrou, ar voul-ze ha n'eo ket goude omm nemed eur hreunenn dreuz kollet er pezh n'en-deus ment ebed, er mare ma komzan evid deski deoh anaoud an Doue oll-gallouduz, heb ment, peurbaduz/ Mestr hep hini all ebed euz an douarou hag euz ar stered ?

Laeron-vor a dostae heb ehan, beteg ma oe degouezet an hini diweza ; ar re mui spontig a zegouezas da ziweza. Gwennig a gomzas outo beteg an noz. Lavared a ree :

-« Doue o kroui an douar hag an den ; an den o tizenti ouz Doue ; Doe o kemered truez ouz e grouadur hag o tegas dezañ ar Hrist e Vab evid her savetei ; en diwez oh en em rei d'an dud a dlee dond davetañ. »

Kardeg, azezet bremañ e harz treid ar zantez, al levenez o para war e dal, Kardeg a gave mad e oll gomzou.

A-nebeudou e teuas hardiziegez d'al laeron-vor, hag e rejont goulennoù outi. Deuet 'oa ivez tost dezi an den koz hag en-doa daoulagad tan, eun dremm galet, bleo gwenn hir, a gane kanaouenn an heol, hag a zeblante beza he beleg. Ar pezh a lavare ar zantez a sklase muioh-mui he zremm, hag a ree dezañ kaoud eun doare krisoh c'hoaz. Dre e houlennoù dicheg ha founnuz e c'hoantae kas da netra lavarou Gwennig ; houmañ a responte bepred ken eeun ha gand kemend a êzamant ma ree plijadur d'ar gompagnunez.

An noz 'oa deuet adarre war ar hoad, ha Fwennig a hoanteas gounid he zammig toull-ti, a lugerne d'an ampoent war an devent.

An hini koz he harpas.

« Lavar deom c'hoaz, o ! merh ar mor, lavar deom ha na zivenn da Zoue laerez war vor evel ma reom ? Hga zñ e heller beza e vab pa lazer e vreudeur ? Rag aze emañ or micher, or buhez, hag evel-se e tle beza evidom. »

Gwennig a oe skeduz ha brasoh da weled neuze, en deñvalijenn deuet eun eun taol-kont. D'an ampoent an diou groazig a oa war ar beziou a oe evel flammou tan, ar mor a grozas evel n'oa ket kustum da ober, er c'hoant sab ar gwer a strakas hag a hwitellas evel pa vije eur gorventenn o c'hweza warno, ha koulskoude n'oa ket eur mouch avel. Mond a rejont oll kuit, nemed Kardeg, a oa kouezet adarre da dreid ar zantez ; an hini koz ivez a oa chomet. Doue a grozas dre ar bugel :

-« Den koz, hag evel-se prezeger al lazerez pa brezegan ar garantez hag ar guñvelez ? Ra vezi milliget, sar pant ! Ha c'hai ar re³⁹ hoh-eus va hlevet o prezeg krantez eun Doue evdi e vugale, dizale e welot kalir e vuanegez oh en em stleja war e enebourien, evel ouz ster a dan hag a walho ar vro-mañ diou pehejou an dud. Ho pugale vihan a vezo benniget. »

Ha neuze, gand eun deneredigez velkoniuz e lavaras kenavo :

-« Mond a ran kuit abalamour eu avel a vuanegez a hwezo prestig en ho kalonou difeiz ; gweled a ran eun arne hag a ya da drei enebdon. N'ankounac'hait ket koulskoude ez on bet amañ. Kardeg hen degaso deoh da zoñj... Savit, va breur, setu amañ levr ar guñvelez (an daouster) ; hel lezel a ran ganez, kee d'e lenn d'ar gouezleh ; na zistro nemed pa e-pezo e gomprenet mad, evid e zeski d'az preudeur. »

Heñvel ouz Loth o tehed euz a gêr Sodom, douget gand eun nerz a deue dezañ euz an neñv, Kardeg a yeas buanna ma'h helle a-dreuz ar hoad, hep kredi selled war e lerh, gantañ teñzor-furnez Doue : an Aviel.

Pa oa eet a-ziwar wel, Gwennig ivez a yeas en he zi. Diouz groazig ar beziou hag a zeblante beza greet gand flammou tan a vougas hag a gouezas e ludu.

An oll a oa sioul. Ar beleg koz en-doa pletet e benn dindan malloz ar zantez. E zevel a reas en eun taol trumm. E zaoulagad a luhe evel diou steredenn en oabl. Laket e oe an tan er goulou rousin, hag ar paotr koz a gomzas ; c'hoaz 'reas tan ar veñjañs er re oll a zante o tiwan

³⁹ ar re : pere, er skrid orin.

en o halon an arne ag an hini⁴⁰ he-doa komzet ar zantez. Lavared a reas ouspenn penaoz an heol, mestr oll-halloudeg, ha doue hep ken-all er bed oll, e labourer ar hlezeier evid kastiza ar re a droje kein dezañ.

Mond a rejont oll neuze en hent, lod gand youhadennou a gounnar, oh heja ar ousin, loed all etre daou, na ouient ket ker e pe du trei, eter diou walenn a ispill a-zioh o fenn ; hogen ar remañ o vond da heul n'o-doa fiziañs nemed e madelez Doue Gwennig.

Dre ma tostaent ti Gwennig a golle e sked, ha n'oa mui dizale nemed eur bernig mein du evel a-ziagent. Kennerezet gand se, al laeron-vor a dostaas oh an ti, evid merzeria ar verhig santel. Hogen, dre ma toataent, an dud a deue da veza rouez, rag kalz anezo a chome a-zav o soñjal e malloz ar bugel ; ar zoñj anezi a vire outo da vond larkoh. Degouezet e-kichenn an ti dister, ne jome ken nemed an hini koz. A-veh m'en-doe lammet an treuzou ma oe gwelet eul luhedenn o treuzi an oabl en eur ober eun touz spontuz : ar gurun a oa kouezet war an ti. Eur barr avel deuet war-lerh a skubas al ludu beteg ar mor, heb na chomas an disterra arouez anezañ ; ar rousin a vougas ; hag al laeron kouezet d'an douar, e-keriz an deñvalijenn, a grede dezo beza eet da netra. D'an heveleb mare, Gwennig a oe gwelet war an devenn, he gwiskamant sklêrijenn en-dro dezi. Lakaad a reas he zried war ar mor, hag e tistroas d'he bro...

⁴⁰ ag an hini : a behini, er skrid orin.